


imbourc'h



KELAOUENN A STUDI

31 Genver 1980

Niverenn 121

IMBOURC'H, KELAOUENN A STUDI

Unnekvet bloavezh

31 Genver 1980

Niverenn 121

Barzhonegoù gant Anjela Duval.....P.5
 Notennoù politikel gant Youenn Olier....p.9
 Prosez Sant Erwan, gant Klerg.....p.29
 Devezhioù-studi ha beajoù KRISTENION BREIZH
 p.34
 Brezhoneg studi, gant Jil Ewan.....p.35
 Dek mellad an emrenerezh evit Euskadi..p.38
 Kantvet deiz-ha-bloaz Padraig Mac Phiarais
 gant Padraig O Conchuir hag Alan Heusaff
 p.39
 E sigur pennad istor mantrus Sant-Erwan ar
 Vrezhoned e Roma, gant Herve Lanndiern.p.47
 A-dreuz-lenn.....p.61

Koumanant-bloaz : 50 lur. KRP 1 534 25 N, -
 Roazhon, Y. Ollivier. E miz Genver e krog
 ar c'houmanant ha reiñ a ra ar gwir da ze-
 gemer ar stagadennoù, da zibaba ar re a
 garfed prenañ. Priz an niverenn-mañ:10 lur.
 Ar pennadoù a zo da gas da Y. Ollivier, 7
 bd. A.-Burloud, 35 000 Roazhon.

Niverenn-wask : 50 015

ALI A-BOUEZ D'AR GOUMANANTERION

Houmañ a zo kentañ niverenn ar bloavezh 1980. Setu dek vloaz enta e pad ar gelaouenn-mañ hag e teu er-maez ingal bep miz tost da vat. E-kerzh an dek vloaz tremenet ez omp bet harpet gant koutmananterion feal nemet a chom re zister an niver anezho.

Ezhomm he deus IMBOURC'H bezañ skoazellet, hag an doare gwellañ da harpañ ar gelaouenn a zo, evel-just, adkoutmanantiñ adal deroù ar bloaz. Anaoudek-bras e vefemp ouzh hol lennerion ma c'hellfent kas o c'houtmanant en-dro diouzhtu. Dam o deus graet dija ; o zrugarekaat a reomp a galon.

A-hend-all, bez' ez eo IMBOURC'H ur gelaouenn a stourm, hag an holl ne vezont ket plijet dre ret gant pennadoù zo a vez embannet enni. Kavout a rafemp gwel e rofe ar re-mañ da c'houzout deomp ne blij ken dezho degemer ar gelaouenn. A-wechoù e kendalc'her da gas ar gelaouenn bepred dre ma soñjer ez eus un diaester pe un trubuilh bennak o virout ouzh ul lenner a gas ar c'houtmanant (ha se a c'hoarvez e gwirionez) hogen adarre, gwel e kavfemp gouzout diouzhtu ne fell ken da hini pe hini degemer ar gelaouenn. N'o deus nemet kas ur ger deomp (lod a ra) pe gas en-dro an niverenn a zo bet kaset dezho.

Setu daou vloaz e lezomp ar c'houtmanant da 50 lur boutmaz eo aet war greskiñ priz ar bevañ er c'heite-se. A-ratozh hon eus lezet gwerzh ar c'houtmanant izel a-walc'h evit ur gelaouenn a studi. D'ar goutmananterion enta, mar gellont, paeañ ar stagadenoù petra bennak ma n'int ket rediet tamm ebet. Un tu e vo da gempouezañ priz dister ar c'houtmanant. Hep dale e teuo er-maez div stagadenn ; un dastumad kontadennoù. skeudennaouet e brezhoneg eeun gant Erwan ar Menga, hag ur geriadur arnevez (120 ha 250 pe 300 pajenn). Spi hon eus e c'hellho hol lennerion o fourchas. O zrugarekaat a reomp en a-raok.

\$

BARZHONEGOU gant Anjela DUVAL

AN DEN KOZH

Ken flour hag ur rozenn
eo chomet e zremm,
kurunennet e benn
gant e vlev du-ha-gwenn.
Krommet un tamm e chouq,
hag an dilhad a zouq
'zo bremañ kalz re vras.
Met bepred eo ur gwaz,
sklaer e lagad : lemm e selloù
a-dreñv e lunedoù.
Mousfent en e vouse'hoarzh
hag e c'hoarzh 'zo ur marzh.
Ponnerglev un nebeut,
e barland bepred reut.
E varn 'zo atav reizh ;
yac'h e galon 'n e greiz ,
e garantez berv
ouzh e yezh, ouzh e vro...
Ar Breizhad kozh !

21 a viz Kerzu 1979

ARABAT KLEMM

Tra ma vo un doenn 'us d'az penn,
tra ma vo tan en oaled da di paour,
tra ma vo bara war da blankenn
ha dour sklaer en da feunteun,
tra ma 'c'h eus ur mignon
- na ve nemet ur c'hi...
Tra ma kano an adan e beg ar buplienn,
tra ma vleugno al lann unnek miz eus ar bloaz,
tra ma savo an Heol 'tre Kiligwenn ha Pabu
ha ma yel' da guzh 'tre an Dreinded hag ar Seizh-
Sant
- tra ma welo da lagad mil vurzud an Natur,
tra ma klevo da skouarn kleier Tregrom,
o seniñ ken drant an Añjeluz,
tra ma santo da fronelloù
frond an douar nevez-arat,
c'hwez milis ar Spenn-Gwenn,
ha c'hwez soutil ar bizoù-haleg,
tra ma savo da Bedenn
etrezek Mestr ar Bedoù
na lavar ket ez eo ponner
pouez ar Gozhni...

3 a viz Kerzu 1979

NOZ DIWEZHAN AR BLOAZ 1979

Trugarez, Aotrou, evit an holl c'hrasoù degemeret
ganin eus ho perzh e-pad ar bloavezh 1979-mañ
a zo o vont d'ar Beurbadelezh.
- Distaolit din, Aotrou, va mankoù en ho keñ-
ver hag e-keñver va nesañ.
- Roit din, m'Ho ped, grasoù nevez e-leizh
evit ar bloaz 1980 a zo e toull an nor.
- Roit din un tammig yec'hed ha kalz a gouraj.
Roit din sklerijenn ma ne strebotin ket re war an
hent a gas davedoc'h.
- Roit din poell ha muzul, ma ne foranin ket
Ho krasoù na madoù an douar.
- Roit din muioc'h eget n'am eus ezhomm evi-
don va-unan, ma vo tu din da lodenniñ gant kalz
a reoù yaouank hag a reoù gozh o tremen dre va
zi.
- Roit din pasianted ha douster ma ne c'hloa-
zin ket kalon va nesañ.

- Roit, me Ho ped, Aotrou, d'am Bro-Vreizh
ar c'hras da c'hallout magañ he bugale korf ha
spered ; kalon hag ene, ma ne vint ket rediet
da astenn o dorn d'ur Vro fallakr.
- Roit dimp tud fur ha kadarn d'hor ren e
doujañs ho Lezenn hag Hengounioù hon Hendadoù
hag hor Sent.
- Roit beleion d'Hoc'h Iliz, Aotrou, int eo
Holen an Douar.

- Kargit kalon ar mammoù a Garantez hag a emrousted, ma tegemerint laouen ar grouadurion vihan-se a zo bet a-viskoazh ken tost d'Ho Kalon.

- Roit furnez d'ar yaouankizoù da ren ur vuhez divlamm ; kalon da garout al labour a zegas bara war an daol, ha da skoazellañ o zud, d'ober enor o ziegezh hag o bro.

- Aotroù ! Na lezit ket ar broioù d'en em zrailhañ dre gasoni, dre warizi, dre wallc'hoantegezh da vadoù an douar.

- Na lezit ket, Aotroù, ar paour, ar bihan da vezañ flastret dindan dreid ar Gallouduz : C'hwi hoc'h eus krouet an Den dieub.

- Ha na lezit ket ivez an dud da vizeriñ, da voufoniñ hor Breudeur : al loened hag ar plant, o c'hrouet hoc'h eus ivez, Aotroù, zoken a-raok an Den !

- Aotroù, roit d'an holl ar bara-se pemdeziek hoc'h eus desket dimp goulenn dre ar Bater ; diwallit an Douar hag ar pezh a zoug, eus an Droug hag ar Gwallziwezh.

**

Klod deoc'h da viken, Aotroù,
e lein an Nefvoù
hag en holl vedoù !

AMEN !

31 a viz Kerzu 1979

Youenn OLIER

NOTENNOU POLITIKEL

Setu tri miz n'em eus ket bet tro da sevel notennoù politikel ha ken buan ez a an darvoudoù en-dro bemdez m'emañ ar skrid-mañ war var da vezañ digoulzet a-raok bezañ bet embannet zoken.

Eveljust, c'hoarvezout a ra an darvoudoù pennañ en Azia ar C'hreiz, da lavarout eo, en Iran hag en Afganistan. Hogen diwar vremañ n'emañ ken Iraniz hag o dispac'h islamat e diaraog al leurenn bolitikel etrevroadel.

Darn o deus gwelet en habaskted an Amerikaned er gwallzegouezh-mañ un arouez eus diyoul ha dînerzh ar Stadoù-Unanet. Ha gwir eo, en ur grez all, e deroù ar c'hantved-mañ, lakaomp, e vije c'hoarvezet pellzo ur brezel ha gwalc'het er gwad an dismegañs graet da Gornogiz gant ur vroad paour ha dister, isdiorreet, 'keta, e-giz Iraniz. En hon amzer avat e rank Kornogiz - hag an Amerikaned en o zouez, - derc'hel kont eus ur c'hedveno etrevroadel o deus krouet o-unan o sevel ar BROADOU UNANET, hag ivez, na petra, eusan ersav da c'hortoz a-berzh an impalaeriezhoù all, hini Soviediz, peurgent, en drovezh-mañ.

A c'hell bezañ ivez e vije bet saouzanet hag abafet an Amerikaned o-unan gant doare an dispac'h en Iran end-eeun. Hemañ a zo tarzhet, evit darn, a-benn enebîñ ouzh ur renad mac'hom ha na zalc'he ket kalz kont eus "gwirioù mab-den", e-giz ma lavarer. Graet eo bet ivez en anv ar relijion hag an divezouriezh, en anv ar vuhezegezh-vat. N'eus ket da souezhiñ enta e vije bet seizet Carter gant un doare kemplezh a gablusted hag eñ prest dalc'hmat da zifenn gwirioù mab-den evel ur relijion, - gant ar soñj eus ar fazi a zo bet graet gant egenvroiz o harpañ ur mac'homer a seurt gant ar Cha e-pad keit all a amzer. Ouzhpenn-se ez eo bet divarc'het moarvat, hag eñ ur c'hristen deol, war a lavarer, gant arvez krevelzel an dispac'h hon eus meneget a-gent.

Iskis eo rankout diskleriañ politikerezh ur vroad ken bras hag ar Stadoù-Unanet gant spere-degezh un den hepken, hogen gouzout a reer en deus Arlevier ar Riez-se un tamm mat a frankiz evit divizout emzalc'h diavaez ar Stad m'emañ er penn anezhi. Ha marteze ivez ez eo bet kadanet en e zamantiz e-keñver Iraniz gant dezranadurioù e amaezhiezh : paotred an dispac'h islamat, keit ha ma chomint mistri war an Iran, ne c'hellint ket goulenn skoazell ar Rusianed. Ha reizh eo bet ar gweladur-se eus an traoù rak, evel ma ouezer, distalet en deus C'homeini, mall warnañ, ar c'hinnig bet graet gant Soviediz da reiñ un taol-skoaz dezhañ: setu an ael o nac'hañ sikour an Diaoul Ruz a-enep d'an Diaoul Du, ar pezh a zo kempoell a-walc'h, ret eo lavarout !

**

Kent mont pelloc'h gant dielfennadur an darvoudoù en Azia ar C'hreiz e karfen ober un distro-prezeg. Daoust hag an neptuegezh a fell da

C'homeini derc'hel dezhi a zo gallus, diouzh ar savboent politikel a zo e hini ? Daoust hag an dud a relijion a seurt gantañ, ur wech ma vezont krog d'ober politikerezh, n'int ket barnet da zibab un deiz etre Kornogiz vreïn ah Soviediz dizoue ? C'harvezout a ra ganin klevout dehouiz kristen, mirourion anezho, o tamall da C'homeini skoazellañ ar Rusianed, enebourion ar relijion, hep mennout dezhañ, diouzh maz eneb ouzh an Amerikaned a lez frankiz da houmañ, da vihanañ. Souezhet on o verzout penaos e kouezh hevelep kristenion e traped un daelerezh ha na zlefe kaout ster ebet evito. Meur a wech hon eus diskleriet ne oa mui a bobloù kristen, goude maz afe Carter d'an ofis ha Jiskar, marteze, d'an oferenn bep sul. Sevenadur ar c'hornog a zo digristen ha direlijiel, koulz lavaret, ha merket hon eus ne roe Kornogiz frankiz d'ar feiz nemet evel ma roer d'un albac'henn (e-giz ma ro karta Jiskar frankiz d'ar Vrezhoneg, pe kentoc'h, an emsaverion, - sellet avat evel ur vandennad istrogelled torr-r.. - gant resped deoc'h, - a ranker kontantiñ ur wech an amzer evit kaout peoc'h diouto, istrogelled ar brezhoneg... hag ar gallaoueg, 'keta !)

Hogen komzomp eus C'homeini. Moarvat en deus c'hoariet ur roll en ur vro maz eo kreñv enni bepred frammoù ur gevredigezh henvoazel ha na oa ket deuet tre da vat er bed arnevez daoust da holl wallstrivoù ar Cha (ur Per ar Meur n'en deus ket bet chañs!) Moarvat, diouzh ma oa awenet gant ar youl da dec'hout diouzh breinadurezh ha lizadurezh speredel ar C'hornog, e oa un dra bennak emsavus er c'hilstourm en deus diskaret ar Cha (pep kilstourm n'eo ket fall dre natur ; hor stourm-ni, emsaverion, - trist bras eo da lavarout, a zo ur c'hilstourm a-enep da Vro-C'hall ha d'ar galleg o deus degaset an"araokaat"en hor

bro. Hogen, daoust hag an "araokaat"-se n'eo ket un hent-dall? Ha lavarit din : petra 'zo d'ober pa zegouezher e penn un hent-dall ? Nemet souzañ evit kemer an hent mat en-dro ; gwell eo sur-mat eget kenderc'hel da vont war-raok evel un azen aheurtet a gav dezhañ ez eo speredek dre maz a atav war-raok. Daoust ha ne vefe ket poent da herouezerion hor sevenadur ober un tammig emze-rann kent kouezhañ e don an islonk. Ar skiantvat a lavar deomp an dra-se. Pe c'hoazh, gant gerioù all: mennad an araokadouriezh sellet evel ur fetichenn n'en deus ster ebet drezañ e-unan.

O kilañ diwar un hent fall e rankfed gouzout war-du pelec'h e ranker skeiñ a-benn ar fin rak barnet omp da vont war-raok gant an amzer o tremen, n'eus forzh penaos. Dres, en em c'houlenn a ran ha gouzout a ra mat atebelion an dispac'h a-hont da belec'h emaint o vont. Un diouganer eo marteze C'homeini, un den e-unan avat, hag oadet a-benn bremañ. Evit ar re all, ar studierion h.a. 'm eus aon o deus graet evel c'hwegonteizharded Vro-C'hall e 1968 : ur brizh-dispac'h faltaziek. Da vihanañ, ar pezh am laka da arvariñ diwar-benn spiswelled an dispac'herion-se eo o deus miret framm ar riez iranet savet gant ar Cha, hag emzalc'h ar pennadurezhioù nevez e-keñver emsav Kurdiz a ziskouez mat-tre n'o deus ket dilezet youl stadelour ar renad kent. Ne blij ket din kalz damkanadurioù an anvelourion ha douetañs am eus diwar-benn eorizh an emvererezh sellet evel al louzoù-meur e politikerezh. Da vihanañ e kinnig ar re-mañ ur ratozh evit adurzhiañ ar gevredigezh en dazont. Pezh n'o deus ket merzet avat eo n'eus tu ebet da gemm hor c'hevredigezhioù arnevez hep krouiñ unvezioù ha keduniezhoù emvastus ar muiañ ar gwellañ, nemet o tilezel hoal-vat ha pinvidigezh divuzul ar gevredigezh veveziñ, da lavarout eo, oc'h asantiñ d'ur baourentez zo. Hogen

c'hoazh, betek pelec'h e c'heller mont war an hent-se ? C'hwitet eo bet an dispac'h sevenadurel e Sina, ha disoc'het eo arnod Kampoutcheiz da grouiñ ur gevredigezh nevez war an ifern, gwasoc'h eget hini ar Goulag !

Setu aze ivez gwander an Islam pa geñverier anezhi ouzh ar gristeniezh. Houmañ ne glask ket kemm ar gevredigezh en he fezh; klask a ra hepken kempenn houmañ evit an dud a feiz, evit an dud a youl reizh, e diabarzh ur gevredigezh all ha na venn ket distrujañ, war-bouez ur c'henstok peurbadus moarvat, nemet evit chom hep dont da vezañ hec'h-unan un "impalaeriezh". War an poent-se moarvat hor bo tro da zistreiñ ur wech bennak.

**

Ar gudenn a sav evit an Islam eo houmañ : gouest eo da herzel ouzh aloubidigezh ar sevenadur arnevez, frankizour pe sokialour, diouzh m'en em harp war gevredigezhioù a zo manet henvoazel ar pep pennañ anezho ; daoust avat ha liant awalc'h eo meizerezh ar brederourion relijiel islamat evit empennañ ur politikerezh nevez a-grenn hag a rofe tu da azasaat an Islam ouzh un "ar-nevezted" zo, unan disheñvel diouzh an hini a zo o ren hiziv? N'eo ket aes hag ar brederourion gristen klasket ganto un diskoulm d'ar gudenn-se n'odeus graet, a-benn ar fin, nemet degemer en o fezh ar gealiadurezh hag ar politikerezh diorreet gant enebourion o feiz.

**

Distroomp avat da gudenn ar saviad politikel nevez en Azia ar C'hreiz. Skodeget eo bet bediz

gant gwall herrded ar Rusianed oc'h aloubiñ Afganistan diwar c'houlenn renerion gomunour ar vro, a-hervez, e dibenn ar bloaz tremenet. E sigur an darvoud-se e karfen ensellout ersav an tri ferzhiad tostañ en afer, ar Rusianed, an Amerikaned ha Kornogiz dre vras.

N'eus mar ebet ez eo bet broudet ar Rusianed da gas da benn an taol hardizh-se gant estrenvan ha dilusk an Amerikaned en afer Iran, bet meneget ganeomp endeo, daoust ma oa bet graet o soñj ur pennad amzer a-ziaroek moarvat. Evel m'hon eus merket, saouzanet eo manet renerion ar Stadoù Unanet dirak dispac'h Iran.

Start eo krediñ e vije bet galvet ar Rusianed gant komunourion an Afganistan o-unan. Kentañ o deus graet Soviediz oc'h erruout er vro-hont ez eo bet plantañ daouzek bolod e korf rener kozh ar gouarnamant, ur c'homunour a-zoare koulskoude war a lavarer, evit deskiñ dezhañ ober ervat e vicher a rener-stad komunour, ur gentel ha n'eo ket prest da zisoñjal moarvat. Evel en afer Kamputchea - a zo damheñvel ouzh an afer-mañ, - ez eo bet divizet an traoù er par uhelañ hag en dirgel donañ, gant ur c'hengor bihan, e-giz ma vez graet er strolladoù hag er renadoù komunour (a zo leviet gant tud sirius, evel ma ouezer !) Hag a-hend-all, setu pellzo e kasont war-raok o abadenn c'hoari gwezboell penn-da-benn d'ar voull-douar er bloavezhioù diwezhañ-mañ, hep devoudañ ersav sirius ebet a-berzh an Amerikaned pe Kornogiz. Soñj a zo c'hoazh eus emell URSS e Mozambig, Angola, Etiopia, - dre hanterouriezh Koubaiz, - e Kamputchea dre hanterouriezh Vietnamiz. Biskoazh betek-henn n'o doa kredet an Amerikaned zoken: sevel o mouezh nag o biz bihan. Ha moarvat o deus renerion Soviediz poelladet gant reizh (evel m'o doa graet renerion an Alamagn kenelwe-

rinat etre an daou vrezel en Europa war ur bazenn strishoc'h) e vije chomet peoc'h ar Stadoù-Unanet ur wech ouzhpenn evel an "demokratiezhoù" etre 1936 ha 1939 dirak gwalldaolioù Hitler.

Dic'hortoz eo bet enta dazwered an Amerikaned en dro-mañ ha gwall nec'het eo bet meur a vro frankizour, da skouer, gant o youl da voikotiñ ar c'hoariadegoù olumpat e Moskov. En un doare iskis a-walc'h, taeroc'h e vez barnet ha burutellet emzalc'h an Amerikaned gant ar vourc'hizion c'hall eget gant ar gomunourion o-unan, ha da gentañ ar gomunourion c'hall zoken. Gouest eo ar re-mañ da anzav ez eo reizhpoc'h, da vihanañ, politikerezh an Amerikaned ; ne glaskont ket kuzhat an eneberezh a rann ar 'bed sokialour' diouzh an hini kevalaour. Mantret eo avat ar vourc'hizion c'hall gant an darvoudoù dre ma vagont un erez pennek ouzh an Amerikaned. En ur prantad a vrezel yen ne c'hell mui ar C'hallaoued kaezh ren o c'hoari diplomatel, hini ar 'mouche du coche' 'keta, - a denn mui-ouzh-mui da hini ar Vatikano ergentaou, hag a ro kement a blijadur dezho. Ha gwir eo, pa vezer gennet en un enkadenn ne chom mui nemet an nerzh rik, ha n'eo ket o lu nag o bombezennoù a c'hello mirout ouzh ar Rusianed a aloubiñ o bro en deiz maplijo dezho. Moarvat em eus klevet un addispleger bennak er skinwel gall, a gav din, o kontañ penaos e ve prest al levieriezh gall da implijout ar bombezennoù-se evit difenn tiriagezh ar Stad c'hall ; gant an armoù-se - se am eus lennet n'ouzon ket pelec'h kennebeut - e vefe tu da zistrujañ 80% eus an Unvaniezh Soviedel. Diaes eo gouzout petra a zo gwir e brabañsadennoù ar vatamored-se nemet an hini a asure kement-se ken dinec'h ha tra - e-giz pa vije bet anv a zistrujañ c'hwenn gant DDT - a zleje gouzout ivez e

ve gouest ar Rusianed, diouzh o zu, da zistrujañ Bro-C'hall 100%, ar pezh a vefe gwashoc'h un tamm, a gav din, rak tu a zo da adsevel ur vro goude ma ne chomfe mui nemet 20% eus ar boblañs nemet gant 0%, ret eo anzav e vefe diaesoc'h ober kement-all !

Hogen daoust ha sirius eo fogasiñ gant jedadennoù tud sod a seurt se? Ar wirionez eo ne c'hell ket ar C'hallaoued herzel ouzh ar Rusianed na gant o bombezennoù na gant o nerzh-lu. Ne c'hellint biken implijout o bombezennoù, anat eo, - un emlazhadeg ne ve ken - hag o lueoz ne vint ket evit derc'hel ouzhpenn teir sizhun ur wech ma vo deuet tre ar soudarded rusianeg Alamagn ar C'hornog, anezhi un trepas a dri-c'hant kilometrad bennak. Arabat eo disoñjal a-hend-all o deus Soviediz staliet bombezennoù kadoniel liespenn krennhedtaol war diriegezh riezoù komunour ar reter ; gant ar bombezennoù-se e c'hellont tizhout en un doare resis-tre, war-bouez un nebeut kantmetradoù, pennañ amkanioù milourel Kornogeuropea ; ha kompren a reer n'eo bet distro un nebeut rannlueoz rusian staliet en R.D.A. ("Riez Demokratel Alamagn") netra nemet un tammig c'hoariva ha na douell den ebet.

Evit respont d'ar gourdrouz-se eo e fell d'an Amerikaned diazezañ d'o zro war diriegezh o c'hevredidi, dreist-holl avat, Alamagn ar C'hornog, fuc'hellou liespenn krennhedtaol a vo buket ivez war-du pouezusañ palioù milourel Rusia, - fuc'hellou ha na vo ket tu da ziskar dre ma nijint a-rez an douar hep bezañ dazverzet d'ar radarioù ; seurt arm a vefe, e gwirionez, dibarrus. E 1984 e tle bezañ dazdodet ar rouedad fuc'hellou -se dre vroioù Europa ar C'hornog a zo prest da da reiñ bod dezho. Rak-se ivez e rankfe Soviediz bezañ reizhet degouezh ar ranndir-mañ a-raok ar

pred-se ; betek ar bloaz-se e vezint barrek da aloubiñ Europa hep devoudañ ur brezel atomel hollzistrujus : hervez reolenn ar c'hoari atomel ne gemer eneber ebet an intrudu da arverañ un arm dereziet dreist da hini e geveler. En tu all d'ar prantad-se avat e vo gennet adarre ar saviad politikel dre ma vo kempouez a-nevez an nerzhoù-lu etre ar C'hornog hag ar Reter : riez ebet ne c'hell en em varn d'an distrujidigezh gant an armoù atomel belloniel. Gwelout a reer enta n'eo gouest na Bro-c'hall, na bro etre pe vihan ebet da gemer perzh da vat er c'hevezerezh atomel (aesoc'h e vefe c'hoazh henn ober d'ar strolloù spontelour diatebek a-grenn!) Adal bremañ emañ dastumvaoù an armoù atomel gall dindan tennoù ar fuc'hellou rusian krenhedtaol. N'o deus ar C'hallaoued arm derc'hanel e bet a glotfe ouzh armoù kadoniel Soviediz (bepred e degouezh - dic'hallus - ur brezel etre Rusia ha Bro-C'hall, hep emell an Amerikaned hag ar bed a-bezh en diwezh) ; ne c'hell ket ar C'hallaoued implijout o armoù derc'hanel dre maz int armoù hollzistrujus nemetken. Gwir eo emañ Chirac kaezh o paouez goulenn e ve savet dek lestr -spluj atomel gall ac'hann... d'ar bloaz 2.000 (e-giz pa ne zleje c'hoarvezout netra er c'heite-se er c'hornog hag er bed a-bezh) ; se a ziskouez ez eo donezonet ar politiker-mañ da aozañ roman-toù pe filmoù a skiant-faltazi kentoc'h eget evit ren ur vro en un doare poellek.

Moarvat, mui pe vui, ez eo emouez ar bolitikerion c'hall ouzh an enkadenn foll m'emañ o stad paket enni. Rak-se ivez e tamsañjont dija e vo dav dezho, deiz pe zeiz, en em renkañ gant ar riez rusian deuet da vezañ evit Bro-C'hall ar galloud-gwareziñ ez eo bet ar Stadoù-Unanet pell amzer eviti. Sebezet - ha feuket - eo bet meur

a hini o klevout er skinwel gall, eus Moskov avat ur Marchais rok ha gogeüs evel boaz o tifenn taer politikerezh diavaez ar Rusianed, hep bezañ dislavaret, nemet diwar veg an teod, gant al levierion c'hall, a-benn ar fin. Soñjal a rafed a-walc'h ne zamant ar re-mañ kement d'ar rener komunour nemet dre ma tamgredont e c'hellfe ar gomunourion c'hall, dres, kinnig un deiz bennak un digor d'an hent-dall m'emañ bac'het ennañ gant o folitikerezh embannet pep-tra-pe-netra, ha na ro dibab ebet etre un dishualded azvanek, n' eus forzh penaos, hag an distrujidigezh klok. Merkañ a c'heller e tiwall al levierion c'hall da anozañ paotred ar C'hremlin : Chaban-Delmas en deus kemeret da zigarez d'e zistro eus Rusia, n'eo ket aloubidigezh Afganistan (etre ez-impalaourion hag impalaourion en em gomprenere dalc'hmat) hogen un afer dister a-walc'h, hini harluidigezh un trubuilher (unan a zoare, brudet, Sac'harov : ar geizh heskinet, an dud a relijion heskinet er vrose ne gontont ket eveljust), ur gammed ha n'eo ket gwallveskus e gwirionez peogwir eo bet graet gant ar gomunourion c'hall o-unan !

**

Daoust ha komz a c'heller eus ur vroad c'hall a-hend-all ? Bez' ez eus ur riez c'hall moarvat hogen houmañ a zo intret ken don he frammoù gant ar gealiadurezh varksat m'he deus kollet, war-bouez nebeut, he spered broadel. Ar republikoù gall a-ziagent o doa dalc'het da vojenn un "istor Bro-C'hall" bennak (me ' lavar "mojenn" rak peseurt ster a c'hell kaout tonkadur Janed Ark evit bourc'hizion c'hall digristen?) Miret o doa ivez un divezouriezh lik bet awenet gant ar feiz kristen. Kement-se a zo echu bremañ. Akedet o deus an amaezhidi a zo kiriek d'ar c'helennerezh

e Bro-C'hall hiziv chom hep diskouez istor ar vroad c'hall evel ur c'hendalc'h istorek. Diwar vremañ ne vez mui graet er skolioù nemet un tamm displeg bep an amzer diwar-benn prantadoù zo, o pouezañ war arvez armerzhel, kevredigezhel pe sevenadurel ar prantadoù-se, hep derc'hel kont eus heuliad an darvoudoù o-unan, da lavarout eo, o nac'hañ e ve un istor politikel gall... ken na darzhas an Dispac'h Gall, na petra, pe ken n'en em ziskouezas Karl Marks. Evel m'hon eus lavaret endeo, trevadennet eo maodiernezh an Deskadurezh C'hall gant komunourion ha sokialourion a ro d'ar steuñvoù-keleñn liv o mennozioù.

Gallus eo ivez, diouzh un tu all, e tenne an arnodoù da reizhañ skritur ar galleg pe an doare nevez da gelenn ar yezh er skolioù da derriñ un hengoun stag ouzh stuz ur gevredigezh henvoazel a venner distrujañ.

En ur par all e klask an Deskadurezh Vroadel c'hall - met se a c'hoarvez e broioù all evel en Alamagn - adstummañ speredoù ar rummadoù yaouank war ur bazenn all a zo nes-tre d'ar vuhezegezh henvoazel : hini ar revelezh. Ebarzhet eo bet an "diorroadurezh revel" e steuñvoù-keleñn ar skolioù gall, adal ar pevare klas. Diwar vremañ e vez lakaet etre daouarn ar grennarded - dezho daouzek pe drizek vloaz - donnlevrioù a vevoniezh maz eus enno ur pennad penn-da-benn gouestlet d'an deskoniadur revel, gant skeudennoù h.a. hag int lakaet e gwerzh gant embannerion skolek bras e-giz Nathan, Bordas, Hachette. Ar pezh a zo a-bouez en afer-mañ adarre ez eo youl empennerion ar steuñv-studi-mañ war seurt tachenn hag hini aozerion an donnlevrioù o-unan : adarre ha dalc'hmat displeberañ ha kas da get ar speredegezh hag ar vuhezegezh henvoazel (an iskisañ avat eo e vez arveret ar skridoù-se er skolioù

'kristen' end-eeun).

En em c'houlenn a c'heller zoken ha ne vez ket arveret ar werinoniezh hec'h-unan gant marksourion zo e Breizh evel un tu da vreinañ ar stuzegezh vourc'hiz, ya, ar gallaoueg e-unan, daoust maz eo tennoc'h-tennañ ober gant an armañ diouzh ma n'eus mui a stuzegezh poblek bev a ve eztaolet dre ar parladoù brezhonek pe gallaouek ; houmañ, evel ar peurrest, n'eo mui nemet un iskenderc'had eus ar sevenadur-beveziñ m'em-aomp beuzet ennañ, skignet dre ar pladennoù, ar skingomz pe ar skinwel, ar yoc'hstlenn bepred, gant an hevelep mennad : skarzhañ ur sevenadur zo evit reiñ lec'h d'unan all.

**

Ne reomp amañ, eveljust, nemet dezrannañ ha diskleriañ, ha n'eo ket barn ha tamall (ne damallomp ket peogwir n'eus netra boutin, a-benn ar fin, etre dalc'herion ar sevenadur gall bourc'hiz pe sokialour dizoue hag an emsaverion a fell dezho adsevel ur Vreizh kristen). A-hend-all, gouzout a reomp ez eo bet implijet ivez ar stuzegezh poblek e Breizh - e deroù ar c'hantved, da skouer, gant mirourion gristen evit enebiñ ivez ouzh ar stuzegezh vourc'hiz c'hall a neuze (d'ur mare avat ma oa bev-buhezek c'hoazh ar stuzegezh-se). Ne rebechomp ket ouzh ar varksourion implijout ar 'werinoniezh' evit diskar ur stuzegezh a argarzhont (hag a zo da argarzhiñ d'ar gristenion ivez, forzh peñaos ; er stourm a renomp evit amsaviñ ur sevenadur dizoue gant ur sevenadur kristen e rankomp-ni ivez ober gant arm ar stuziadur). Met ar gwir hon eus ivez da ziskuliañ kement itrik a vez implijet gant hon eneberion war dachenn ar feiz hag ar vrezhonelezh evit lakaat o c'healiadurezh hag o bedvezadur da drec'hiñ.

Hogen n'eo ket an evezhiadenn-mañ a zo an hini bouezusañ da ober, - kentoc'h avat houmañ : ar C'hallaoued - lakaet e vijent bet gwech ebet n'int ket mui ur bobl ; n'o deus mui unded speredel ebet ; troc'het int diouzh o zremened a bobl (pe, kentoc'h, ar pobloù a zo aet d'henn ober a zo bet dispartiet diouzh o zremened a vroadoù kristen gant ar Stad he deus lonket anezho). Ne zifenn ar C'hallaoued enta speredelezh ebet ... er gwellañ degouezh - a zo e gwirionez ar gwashañ degouezh - n'int mui peget kenetrezo nemet gant un dastumad lazoù armerzhel. Ar Rusianed, er c'hontrol, a ren ur groaziadeg evit ur relijion. Diouzh m'o deus ar C'hallaoued unan n'eo houmañ nemet ar relijion varksat hag hi degemeret gant an "intellinjentsia" hag ar vourc'hizion speredek, e stumm pe stumm. Gounezet eo dezhi ivez un darn vat eus an amaezhiezh. Peseurt brezel enta a c'hellfe ren ar "bobl c'hall" a-enep da zifennion ur relijion nevez bet hanter degemeret ganti adal bremañ ?

**

Hogen distroomp da graf an dishualded c'hall diarc'het gant an ez-vaodiern Poniatowski hag eztaolet gant nac'h Jiskar da vont da emzvizout e Bonn gant an Amerikaned hag o c'hevredidi. Diskouez a rafe ur seurt emzalc'h ne gred ket renerion ar Stad c'hall a hiziv e ve prest an Amerikaned da zifenn Europa dre ur brezel atomel - a gav deomp - ha ne soñj ket dezho kennebeut e talv ar boan kemer hevelep riskl evit diwall ar 'bed dieub' diouzh argad ar Rusianed. Moarvat ez eo skoachet e don spered ar vourc'hizion-se ar goanag e vo damantus ar galloud soviedat ouzh ur Vro-C'hall troet d'ar gomunouriezh ha renet gant Marchais, an hini fealañ e-touez ar re fealañ (evel ma spie Gallaoued all, bourc'hi-

zion ivez, e vije bet ar genelwerinelourion alaman damantus ouzh an itron gozh e oa Bro-C'hall). Evel m'hon eus merket, emañ an intelektualed a gleiz - eus ar rozik d'ar ruz-tan - e pep pazenn eus an amaezhierzh gall ; ha bepred o deus ar gouarnamantoù bourc'hiz gall moumounet o c'hleizourion vourc'hiz a c'helle reiñ dezho un anv mat - hag int a-hend-all, prest da reiñ goudor da harluidi - brudet kement ha maz eus tu rak ar geizh adarre ne gontont ket - eus Kreisteiz Amerika bet heskinet gant levierzhioù dehouelour ar rannved-se. Setu, lakaet e teufe tre ar Rusianed en Europa ar C'hornog (evit mirout ouzh an impalaourion amerikan a iriennañ eno evel ma raent en Afganistan, 'keta) ez eo peuzsur ne glasko ket ar Riez C'hall herzel a-zevri ouzh an alouberion daoust d'ar raktresoù kaer ijinet gant Strollad-Uhel al lu gall, moarvat evit deverrañ e amzer: penaos faltaziañ e c'hellfe ur vro maz eus enni etre 20% ha 25% eus ar boblañs o vouezhiañ a-du gant ur PCF leal a-grenn ouzh URSS stourm da vat ouzh ar galloud-se ? Bezomp sur e vo prest kaer an diplomated c'hall neuze da ginnig o servijoù mat evit plaenaat an tabut dister a chomo c'hoazh etre an Amerikaned hag ar Rusianed.

Ar pezh a fell deomp lavarout- ha se a zo bet diskouezet mat e-barzh studiaden Per Bourdellez, eo e vevomp e-barzh kevredigezhioù a zo hanter marksekaet endeo ha n'o deus abeg mat ebet da herzel ouzh ar varksegezh rik : daoust ha Jiskar - hag en kristen sañset - n'en deus ket graet politikerezh enebourion ar feiz kristen o lakaat darbenn, da skouer, e lezenn diwar-benn ar sio-c'hanerezh? Kavout a ra din enta e rank ar Stad Arnevez - lavaromp kentoc'h ar "Stad Impalaour" rak ken kozh hag ar bed ez eo - mont betek penn hec'h emdroadur boulc'het ur seizh kantved ben-

nak a zo : atav hon eus adlavaret ne oa ket bet dispac'h gall 1789 ur gwir zispac'h, - un tamm folklor gwadek, ne lavaran ket, hag e vije ar bed er stad m'emañ hep ar folklor-se zoken: dija o doa graet ar Saozon o dispac'h a-enep d'an Iliz daou gantved a-raok. Ya, betek penn hec'h emdroadur ez aio ar Stad Impalaour, da lavarout eo, betek hec'h emzistruj.

**

Hiniennoù a gavo dezho e welan an traoù war o zu fall. E gwirionez ez on bet lakaet da brederiañ gant ardoù rok Marchais - a gavan fentus a-wechoù - oc'h emzivistout eus Moskov er skinwel gall. Evit bezañ torret Unvaniezh an Tu-Kleiz daou vloaz zo, bezañ savet krenn a-du gant URSS en deizioù-mañ ha bezañ komzet ken taer ha diogel diwar-benn dispac'h adarre e rank Marchais kontañ muioc'h war an darvoudoù endiavaez da Vro-C'hall eget war un drec'h-adenn bennak - berrbad marteze - e dilennadegoù ar Stad C'hall e-lec'h emañ gennet ar saviad politikel. Damsur e c'heller bezañ ez eo uhelc'hoant ar Strollad Komunour Gall hag a sell outañ evel gwir hêr emsav an Dispac'h gall eus 1789, bezañ blenier ar strolladoù komunour all eus Europa ar C'hornog. Dirak ur seurt strollad - a vo harpet a-benn ar fin gant ar vourc'hizion c'hall riezour, petra a c'hello ober hor paour-kaezh U.D.B. ...? 'M eus aon e vo gouzañvet - ma vez gouzañvet - evel un tamm strollad folklorek bennak tonket dezhañ reoliñ al luskad brezhon evit kont ar Strollad Komunour Gall e-unan.

Dres, en em c'houlenn a c'heller peseurt ersav en devo ar strollad brezhon-mañ dirak ar c'henedgouezh etrevroadel nevez. Moarvat o deus skri-

vagnerion bPOBL VREIZH savet o mouezh a-enep da aloubidigezh Afganistan gant ar Rusianed. Hogen n'eus bet embannet c'hoazh diskleriadenn geografidiel ebet a-berzh ar Strollad. Deurus e vo evezhiañ ouzh savlec'hiadur UDB er blegenn nevez-mañ. Padal, diouzh ur sellboent broadel rik - a zlefe bezañ ivez hini ar strollad-mañ - ne c'hell ket intrudu ar Rusianed bezañ darbennet. Ne vern ket e vije bet gladdalc'hel - war a lavarere - renad ha kevredigezh rak-komunour Afganistan. Pep bro avat he deus ar gwir da emdreiñ hervez he natur hag he stuz, e pep frankiz (d'am soñj ne c'hell bezañ roet gwir da emellout en aferioù diabarzh ur vro nemet d'ur veliezh etrevroadel hag en un degouezh hepken : pa vez breset gwirioù mab-den). E Breizh ivez o deus ar republikaned c'hall, en amzer ar chouanterezh, kemeret da zigarez ar c'hladdalc'helezh evit sujañ hor pobl d'o lezenn hep damant ebet, en un doare kriz ha ha divalav. Padal, Kadoudal e-unan er penn-kentañ a oa a-du evit kemm ar gevredigezh; hag evit stourm ouzh an impalaourion c'hall - a oa republikaned - en deus en em gevredet gant ar rouelourion c'hall. Kement-se avat ne dalv ket e soñje e oa ret mirout ar gevredigezh e Breizh e-giz ma oa ; ar republikaned c'hall eo o deus e rediet d'ur c'hilstourm dall. Ma vije bet Breizh dieub enta evije emdroet hervez he lezenn hec'h-unan. Er bloavezhioù diwezhañ ez anzave ar Strollad Komunour Gall e oa arabat d'ar Rusianed emellout en aferioù diabarzh Tchec'hoslovakia e 1968 met kement-se a anzave emichañs diwar veg an teod, evit ar bruderezh, rak ar strollad-mañ n'en deus barnet nepred emell ar Rusianed en Hungaria, hag a-ziagent en devoa kendaonet Tito evit bezañ hej et kuit yev ar Riez Rusian. Evel ma lavaromp bepred : etre impalaourion en em gomprenere atav.

**

En hon amzer ne oar ket ar gristenion en hor bro muioc'h eget e broioù all peseurt emzalc'h kemer dirak ar reveulzioù a zo o c'hoiñ dre ar bed. Er c'heñver-se n'o deus ar veleion e Breizh - darn zoken a zo en emsav sañset - nemet mennozioù gall.

War hor meno, re zister eo niver ar gristenion ha re enk o levezon er gevredigezh evit ma c'hellfent c'hoari ur roll politikel bennak, n'eus forzh penaos. Eveljust e vefe diboell eus o ferzh harpañ ar renadoù pe ar strolladoù emanvet ar-aogelour, - se hon eus lavaret alies. Anat eo n'o devo biken an disterañ delanvad war ar vistri nevez : dav e vo dezho sentiñ penn-da-benn pe e vint diskarzhet ; sklaer eo kement-se. Hogen dre vras, en hor grez m'emañ diskaret an Iliz, ne zle ket ar gristenion kemer perzh oberiant zoken e nep politikerezh, en ur politikerezh enep-komunour zoken rak ar politikerezh-se a zo kaset da benn gant renadoù ha kevredigezhioù digristen ha direlijiel : eorizh ar frankizouriezh a guzh gwir zremm ar sevenadur dizoue a zo bet krouet war zismantroù ar c'hristenva. Bez' e tle ar gristenion kreizennañ o strivoù en-dro d'an Iliz e kement bro m'emañ o vevañ rak houmañ hepken a zo asur da badout. Me ' oar ez eo techet kristenion zo, dehouelourion c'hall anezho dreist-holl, da stagañ silvidigezh ar gristeniezh hag an Iliz ouzh disoc'h ar c'henstok etre an Amerikaned ha renadoù dehouat Suamerika, diouzh un tu, ha URSS diouzh un tu all. Hogen hevelep politikerezh - dreist-holl en Europa - a emleg re a zañjerieù ha da gentañ hini ur brezel atomel etrekevandirel evit bezañ degemeret a galon skañv. A-hend-all,-

politikeladur ar gristenion eo en deus diskaret an Iliz en hor c'hantved dreist-holl, pe e ve ar politikeladur-se a-gleiz pe e ve a-zehoù; ar politikeladur eo a zo o kas an Iliz da get en hon amzer, hag o tistrujañ ar feiz war un dro, dre ma enframm ar gristenion e-barzh aozadurioù, stroladoù pe stadoù digristen pe amgristen, goude ma vije awenet o emzalc'h gant ur youl-vat bennak.

Ar pezh a rank kounañ ar gristenion eo ez eo touellwelus diabelloù un istor hollvedel m'hor befe perzh ennañ ; en istor-se n'hon eus bet ha n'hor bo biken krog ebet. E dalc'h an dargouezh emañ, diouzh maz eo distag diouzh istor an Iliz:c'hoari politikel ebet n'eo graet en a-raok. Lakomp zoken e ve ar gomunouriezh rusian prest da drec'hiñ en Europa peurgent ; daoust avat hag asantiñ a raio Sinaiz da emled ar Riez Rusian betek aodoù ar Meurvor Atlantel ? Ha dres, emañ an Amerikaned o klask c'hoari diwar vremañ ar gartenn sinaat, petra bennak ma c'hell unan en em c'houlenn ha ken fur-se eo a-berzh an Amerikaned c'hoari hevelep kartenn. N'eo ket gwell Sinaiz eget ar Rusianed ha gwall aes e vefe d'ar re-se ober o mad eus ur c'henstok etre Amerikaned, Kornogeuropiz ha Rusianed evit emellout en aferioù hor rannved oc'h en em harpañ war un nerzh-lu a vo bet diorreet gant sikour an Amerikaned o-unan. Hogen daoust ha ret e vefe zoken da Sinaiz brezeliñ a-enep d'ar Rusianed? Ma stagfe ar re-mañ Kornog-europiz ouzh o riez, -un tamm start da lonkañ ha da esmoliñ, e sachfent war o c'hein trubuilhoù a a bep seurt, ha na vint ket dleet hepken d'an enep-komunourion. Aes e vo d'ar mare-se da Sinaiz implijout an arm kealiadurezhela-enepda gomunourion all enket en ur saviad diaes gant un drec'hadenn na vint ket gouest da gorvoiñ marte-

ze.

Evit ur c'hristen ne zlefe ket troioù-distrioù an 'istor' kaout muioc'h a bouez eget tabutoù roueedigoù ar grennamzer, ha na zellezent nemet dispriz ; istor ar bed n'en deus ket muioc'h a bouez eget un abadenn c'hoari gwezboell pe vell-droad. Rak gwir Istor ar Bed n'emañ ket aze, dres ; n'emañ ket e darvoudennoù ha degouezhennoù ha na reont nemet teñvalaat gwir istor ar bed a zo hini an Iliz. Eus kenstok an impalaeriezhoù ne zisoc'ho netra, - nemet distrujidigezh an impalaeriezhoù o-unan.

Arabat eo zoken huñvreal diwar-benn istor an Iliz evel hini ur Strollad pe ur Stad pe un impalaeriezh. Pezh a gont, a-benn ar fin, ez eo pezh a ra pep kristen ha pep keduniezh kristen en he c'horn en un amva politikel bennak, nemet e framm hag e santelezh an Iliz, anezhi bodad bugale Doue. Pezh a gont, eveljust, n'eo ket ar sevenidigezhioù politikel ha sevenadurel daoust maz eo diziouerus ar re-se evit eztaoliñ ar feiz; hogen kounañ a zleomp emañ Rouantelezh Doue en hon diabarzh da gentañ, ha n'he deus an Iliz ster na talvoudegezh ebet hep kantroidigezh pep kristen.

N'eus forzh penaos ez eo bet diouganet deomp e padfe dreog ha gwinizh betek fin ar bed ; se zo lavarout n'eus ket da c'hortoz e ve biken ur gevredigezh hollet pe vloc'hel unvan hep kenstok nag arallekadur, a zo huñvre an dud a c'halloud a garfe ren war un tropellad moc'h karget rez o c'hof, hag o reiñ peoc'h. Ar C'hrist en deus degaset ar c'hleze, da lavarout eo, ar c'henstok peurbadus betek fin ar bed. Ar fazi gwashañ a c'hellfemp ober evel kristenion avat e vefe krediñ e vo sevenet mennad an Aviel gant ur politikerezh a hiraezh hepken da unded unrezekaus an impalaeriezhoù.

XXXXXXXXXXXXXXXXXXXX

GERIOU DIVOUTIN

A. ADDISPLEGER/commentateur. ADEILAD/bâtiment. ADEILADAOZER/promoteur. AMAEZHIAD/fonctionnaire. MAEZHIADUREL/administratif. AMAEZHIEREZH/administration. AMVA/environnement. ARAOKADOURIEZH & ARAOGELOURIEZH/progressisme. ARLEVIER/président. ARNEVEZTED/modernité. ATEBEG & ATEBEK/responsable ag & g. AZASAAT/adapter. AZVANEK/fictif.

B. BARNEREZH/justice. BELLONIEL/stratégique. BEVEZIN/consommer. BRIENT/privilège. BRODIREL/autochtone. BRUSKLUN/buste. BUZAD/bénéfice.

K. KADONIEL/tactique. KALVEZEKAET/technicisé. KALVEZEL/technique. KANTREOL/normal. KANTROIDIGEZH/conversion. KANTOUT/considérer. KAUGANTAN/ratifier. KEALIADUREZH/idéologie. KEDUNIAD/concordat. KEDUNIEZH/communauté. KEDVENO/opinion publique. KEFRIDIEL/officiel. KEHENTEREZH/communication. KELLID/finance. KEMPOELL/logique. KENSTOK/conflict. KENDERC'HAD/produit. KEVANDIREL/continental. KEVELER/partenaire. KEVREDADUR & KEVELADUR/association. KEVELER/partenaire KILSTOURM/réaction. KRENNHEDTAOL/de portée intermédiaire. KRERIAD/congrégation.

D. DAELEREZH/dialectique. DAMKANADUR/théorisation. DARGOUEZH/hazard. DAZDODIN/répartir (localement). DAZVERZOUT/détecter. (ivez : DISKELATA/) DAZWERED/réaction. DERC'HAVIANT/culture (de l'esprit). DERC'HOUEZER/représentant. DESKONIADUR/initiation. DIBARRUS/imparable. DILUSK/inertie. DIOGELROEZ/sureté & sécurité. DEVOUDAN/causer. DIVEZOURIEZH/morale. DIVODAN/dissoudre (une assemblée). DIORROADUREZH/éducation.

E. EMELL/intervention. EMPLEGAN/impliquer. EMSAVUS/positif. emzevrann/auto-critique. ENSAVADUR/institution. EORIZH/idéal, mythe. EVODAN/émaner. EZTAOLIN/esprimer. F. FEUZ/chance. FUC'HELL/fusée, missile (ivez BANNADELL/engin balistique). G. GLADDALC'HEL/féodal. GWALLVESKUS/compromettant. GWENGEL/mythe. GWERINONIEZH/folklore. H. HANTEROURIEZH/intermédiaire. HENVOAZEL/traditionnel. HEROUEZER/qui favorise,

(Kendalc'h war ar bajenn 64)

KLERG

PROSEZ SANT ERWAN

(kv. LA BORDERIE)

EN GALLETAYNE - HYRAES

War niverenn 98 eus BARR-HEOL e oa bet klasket diskleriañ anv kure Landreger "Custos reliquiarum", 'mirer ar relegoù', da lavarout eo ar beleg karget da ziwall relegoù ar Sent ha da deurel evezh ouzh bez Sant Erwan ivez moarvat.

Maoris, Mauricius, e oa anv-badez ar beleg. E anv familh avat, a zo daou stumm dezhañ : GALL(test CLV, pajenn 222) hag ENGALLETAYNE (test CLVI, pajenn 223). An doare eeunañ, d'hor meno, da gompren an diforc'h etre an daou stumm ez eo gwelout ur fazi a-berzh ar sekretour karget da skrivañ an testeni kentañ, kollet gant distagadur iskis ar c'hure, hag o verkañ an anv -se e-giz ma c'helle : "GALLE". An anv war e hed a zo eta : ENGALLETAYNE. Goude bezañ goulennet avat e ali digant mirour dielldi an departamant e Sant-Brieg e rankomp disteurel ar stumm ENGALLETAYNE en devoa roet kement a zarbar deomp-ni.

Rannañ a reomp eta an anv evel-henn : EN GAL(L) LETAYNE. An daou c'her kentañ a zo splann : AR GALL. Ar peurrest a zo ken sklaer all,... pe dost. Rannañ a reomp LET -(t) AYNE, an t eus TAYNE o vezañ bet kendeuzet gant an t eus LET. LET a dalv led,dam,tost ha TAYNE a gomprenomp TANE (=ruz-flamm), da lavarout eo ruz a-walc'h, damruz : liv blev ar beleg, pe e fas ruspin.kavet hon eus bet dija ar ger TANE en anv distreset da vat HABLANCLAHE o talvezout : ABRANTANE (=abrant tane).

HYRAES.

Div wech ez eo meneget an anv-mañ e levr Prosez Sant Erwan, pajenn 240 ha pajenn 279. Er bajenn 240 e kaver Johannes Hyraes(moarvat:'Gwilherm').Emichañs e oa Yann ha Gwilherm eus an hevelep tiegezh, met an dra-se n'en deus tamm pouez ebet en hon istor.

An HYRAES kentañ, Yann eta,a oa 'clericus',lakomp 'paotr e bluenn'.Ur plac'h yaouank eus a Blistin-antraezh pe eus a Lanneur : Katell Aofred (pe Aotred) bet kropet hec'h holl izili, a voe pareet e Langoad, war hent ar gêr. Ur wech bennak e tistroimp war ar burzhud-se, met da c'hortoz, merkomp e fellas dezhi dimeziñ gnat ar Yann Hyraes-se.

Er bajenn 279 e komzer eus intañvez G.Hyraes eta. Kement a stummoù a wisk anv an intañvez-se ma tina-c'homp o diskleriañ en dro-mañ. Lakaomp HELENA, da c'hortoz. Seizet e oa ar vaouez-mañ, ha ken torret he c'horf ma veze gwelet he diabarzh, he flugez dre he c'hostez. Un deiz bennak,e-kerz gouel Mikael,wardro ar bloaz 1310,e pedas hec'h amezeion d'he sikour da vont d'an iliz. "Sant Erwan," emezi, "a zo deuet d'am c'havout, ha lakaet en deus e zaouarn en-dro d'am c'hostezioù,ha lavaret en deus din mont d'an iliz..."P'en em gavas e-tal bez ar Sant e lavaras:" Aotrou Sant Erwan am eus gwelet gant ho korf,c'hwil hag

a ra burzhudoù a-bell hag a-dost, ho pediñ a ran d'am disammañ eus an droug-mañ..." Pareet e voe war an taol, hag a-benn eizh deiz goude e oa klozet ar gouli.

HYRAES eta, setu anv-pried HELENA. Aes a-walc'h ez eo gwelout "Hyr" er ger-se, met AES ? Dre se ez eomp da c'houlenn kentel war-eeun digant ar c'hembraeg : HIRAIS, da welout hag-eñ ne rofe ket un diskleriadur bennak poellek a-walc'h.

HIRAIS a zeu eus HIR, na petra 'ta ! Hag eus AIS. Hemañ a zo unan eus liesterioù ar ger ASEN o talvezout 'kostezen'. Al liesterioù all a zo ASENNAU hag ASAU. 'Hirais' a dalvez : "yr asennau hir, ystlys ; the long ribe, flank"(Geiriadur Y Brifysgol, 1979, rann XXIX, pajenn 1870). Da lavarout eo : ar c'hostezennou hir, ar c'hostez hir.

Ma ! Dizanav ned eo ket ar ger AZENN (gwell skrivañ gant daou n), daoust maz eo strishaet da vat an implij anezhañ. R. Hemon a ro, pajenn 57, en e c'he-riadur brezhonek-gallek :

"AZEN f. ezen : côte (de navire) ; membrure." Ankouazh a ra ur ster all : karrez-koad, er penn araok eus un dumporell, da skouer. Met ingal 'zo ! Kement-se a ziskouez e oa ar ger AZEN(N) eus geriadur ar brezhoneg gwechall, hag o talvezout 'kostezen' evel e kembraeg hag e kerneveg tramor. Ha dre-se, daoust ma vank testenioù, e c'hellomp krediñ e oa ivez ur ger evel HIRAIS, skrivet amañ HYRAES. Da lavarout eo, ur stumm-korf bet lesanv da gentañ, ha deuet da vezañ un anv-familh.

Ne ouzomp ket avat hag-eñ ez eo ar memes anv a gaver e MONUMENTS DU PROCES DE CANONISATION DU B. CHARLES DE BLOIS (Sant-Brieg, 1921), pajenn 422:Gwilherm hag e verc'h Sebilla eus Ploesgad Castri Audreni(Plagad Kastellaodren) : YRAEZ a vez graet anezho, hep H en deroù, ha gant ur Z da echuiñ. Ar sekretour hag a skrivas an testenioù-se d'an 13 a viz Eost 1368 a oa eus eskopti Landreger ha Simon Herve a veze graet

anezhañ. Plagad a oa en eskopti Landreger d'ar mare-se.

BBBBBB

Betek-henn n'eo ket bet kavet re denn ar foenn da dennañ, evel ma vez lavaret. Allaz, n'eo ket echu gant hon trubuilhoù, hag e c'houlennomp digant hol lennerion kemer pasianted gant ar spi o devo o digoll a-barzh ar fin !

Rak hon HELENA (pe ar seurt maz eo rak nebeut a chañs he deus da gaout an anv-se!) a zo skrivet c'hoazh anv he gwaz e meur a stumm. Peadra hon eus eta da zirouestlañ !

Ar memes stumm a gaver er pajennoù 189, 190, 191, 192 eus levr La Borderie : AMIREYS. El levr ACTA SANCTORUM avat, pajenn 575, e kaver ANVIROIS. Diwar ur stumm bennak evel AMIROIS e tle donet. Evit abegoù anat e oa bet lennet fall an dornskrid-orin ha setu ma oa aet an M d'ober NV.

Rann ar Gardinaled, pajenn 424, e levr La Borderie, a ro : Helrendis, uxor ANUYETIS. 'Helrendis' (hon HELENA, sañset!), gwreg ANUYETIS. An dibenn TIS a zo touellus amañ, met diskouez a ra hepken e oa bet graet ouzh an anv-se evel pa vije bet un anv latin oc'h echuiñ gant "eis" pe "ies", hag o reiñ en dro-c'henel-ETIS. (kv. QUIES o reiñ QUIETIS hag o talvezout 'repoz', 'diskuizh'.) IES, EIS, eta a ranke bezañ dibenn ar ger-orin, - dres ar pezh a ouzomp : EYS. Ar memes anv ez eo bepred eta, daoust maz eus bet graet yod gant ar c'hreiz anezhañ, MIR o tont da vezañ NUYE.

Dre se n'eus arvar ebet : AMIREYS ez eo anv gwaz an Itron "Heliendis".

Ha petra a c'hellfe an anv-se bezañ nemet AMIREIS ; dres ar c'hontrol, pe dost, eus HIREIS (=HYRAES). Diaes eo spisaat ster ar ger AM a c'hell bezañ ur rakger-nac'hañ pe verkañ hepken un arster-

disteraat. An anv-familh HYRAES a lavare : Kosteziou hir, Korfoù hir. Tregeriz avat, goapaerion douet anezho, ha na chom mann ebet en o zrenñv, a lavare gant fent, pa glevet HYRAES : "Yê da ! Am(h)ireis "Korfoù-hir berr!" pe un dra bennak evel-se. C'hoari a raent eta gant an anv-se. Eveljust, ne lakaomp diforc'h ebet, nemet er skritur, etre HIREIS hag HYRAES o vezañ ma oa heñvel an distagadur.

A-barzh ar fin, ha gant kalz a boan, hon eus adkavet amañ e Breizh, ur ger kar-tost (paz eo an hevelep hini!) d'ar c'hembraeg : HIRAIS.

Hogen an anvioù ENGALLETAYNE hag HYRAES pe AMIREIS a ziskouez pegen pinvidik ha pegen gwevn e oa ar brezhoneg en amzer Sant Erwan.

KLERG

BBBBBBBBBBBBBBBBBB

DA ZIVANKAÑ e-barzh niverenn 118 IMBOURC'H

P. 443. "ken tev ha kof ar c'hlañvour, hag un all ken tev hag e benn..."

P. 444 e ranker lenn : "Anat eo e oa bet troet al latin-mañ diwar an anv gallek : SAUNIER."

P. 450. "Mankeinon" a dalvez "Manchester" ha n'eo ket "Birmingham"

oooooooooooo

DEVEZHIOU-STUDI HA BEAJOU

"KRISTENION BREIZH"

Dalc'het e vo kentañ devezhioù-studi KRISTENION BREIZH adal ar meurzh 8 a viz Ebrel betek ar sadorn 12 a viz Ebrel, e Kistinid evel boaz. Padal e vo aozet moarvat un nebeut ergerzhadennoù e-kerzh an Devezhioù-se, unan anezho en enez Groe e-harz bez ar barz Yann-Ber Kalloc'h emichañs.

E miz Gouere e vo dalc'het devezhioù-studi KRISTENION BREIZH hag EMGLEV AN TIEGEZHIOU, e Kistinid evel kustum, etre ar lañ a viz Gouere hag ar sadorn 5 a viz Gouere. Gouestlet e vo an Devezhioù-se da gentañ d'ar vugale ha d'an tiegezhioù, na petra.

A-benn ar fin, daoust d'ar pezh a zo bet embannet ne vo ket urzhiet ur pirc'hirinaj e-kerzh miz Gouere en abeg da ziaesterioù zo (lojañ h.a.) Er c'hontrol e c'heller bepred reiñ anv evit ur veaj en Iwerzhon hag e Kembre e deroù miz Gwengolo. Amzeriet e vefe ar veaj-se etre an 31 a viz Eost, ur sul anezhi, hag ar sul 7 a viz Gwengolo 1980. Ar pep brasañ eus ar veaj-pirc'hirinaj-se a vefe da dremen en Iwerzhon hogen chom a rafe ar Vrezhoned a-sav e Kembre o tistreiñ da Vreizh. Ar pal a zo speredel da gentañ, da lavarout eo, reiñ tro d'ar gristenion vrezhon da vevañ evel kristenion e-pad ur sizhunvezh ; hag ivez kejout gant katoliked eus ar broioù keltiek e sell d'un obererezh kristen boutin en amzer-da-zont.

Priz an devezh-studi a zo bepred 20 lur.

Evit ar veaj en Iwerzhon ne c'hellomp ket reiñ da c'houzout ur priz resis hogen soñjal a ra deomp ez eo fur kontañ 1.200 ha 1.300 lur. Gwell e vefe paeañ ar veaj en a-raok, adal miz Mae, lakaomp.

Evit en em enskrivañ, skrivañ da :

Aotroù Beleg, M. Blanchard, person, 56 310
KISTINID/BUBRI

Pe : Sekretour KRISTENION BREIZH, Paol Kalvez,
1 square d'Oslo, 35 100 Roazhon

JIL EWAN

BREZHONEG-STUDI

D'AL LENNERION

Peogwir ez eus diaesterioù gant lod lennerion, mil boan dezho, diouzh ma lavaront, o kompren va brezhoneg kalvezel, e fell din skrivañ dezho hiziv, dres a-raok embann ar skrid da heul, evit kemenn dezho e vo kiniget va fennadoù uhel ganin hiviziken dindan an talbenn : BREZHONEG-STUDI.

Diwar vremañ e c'halla pep hini ober e vennoz, adalek ma welo seurt talbenn : pe lenn va skridoù pe ober lamm-choug-e-benn dreisto rak dieub eo ar bismigerion, na petra, da chom hep klask studiañ war un dro ganin penaos sevel hon yezh kalvezel, benveg deuet hiziv koulskoude da vezañ ken andiouerus evidomp e Breizh ha maz eo evit kement pobl diorreet a zo war an douar.

Savet oa bet war-dro ar bloavezhioù 1960 ur c'hevredad anvet S.A.D.E.D., ha buan e teuas hemañ da vezañ ur skol sturyezhañ ma fell c'hoazh da lod skrivagnerion kenderc'hel da labourat hervez ar spered hag an hentennoù anezhi evit krouiñ an nevezc'herioù hon eus mil ezhomm anezho hag evit siellañ diazezoù hon yezh kalvezel war dachenn ar Stad hag ar Skolbenn. Hogen evel maz eo degouezhet din henn lavarout endeo: arabat e chomfe govellour an nevezc'her digas ha digar e-keñver e lenner, rak dlead ar skrivagner zo skoazellañ kement brezhoneger a laka poan da lenn. E gwir, ret eo unaniñ ezhomm ar skrivagner gant hini al lenner. D'ar skrivagner avat eo seveniñ hevelep unanadur, war-bouez embann ha displegañ - evel ma ran

-me dalc'hmat - roll ar gerioù diaes arveret en e skridoù. Hag arabat c'hoazh soñjal ez eo se un alba-c'henn din, rak mui-ouzh-mui e vo ret plaenaat ster ar gerioù nevez evit kement yezh a zo. Boas eo bremañ Stadoù evel hini Frañs abaoe al lamm souezhus graet ergentaou gant ar galvezoniezh d'embann gwech an amzer, - ha war ar 'Journal Officiel', mar plij, - hevelep rolloù a nevezc'herioù ! Siwazh, ni amañ e Breizh n'hon eus KAZETENN GEFRIDIEL ebet evit embann rolloù gerioù nevez bet krouet gant arbennigourion ar galvezezh. Hag evel dres, ne weler den ebet o pismigañ goveliadurioù an arbennigourion c'hall. Yezhoù bourc'hiz ha stadel evel ar galleg o deus brientoù, neketa? En amgin ar brezhoneg n'eus dezhañ hini ebet : pep pismiger, na pa ve bourc'hiz pe divourc'hiz, a c'hall skeiñ gantañ taol ar marv, hemañ en ur stumm, hennezh en ur stumm all.

Darn a soñj dezho avat e vez kinniget betek re gerioù nevez diezhomm e brezhoneg. Hag e respontan: sevel ur yezh arnevez hiziv an deiz n'eo tamm ebet ober evel ma raed er grennamzer, d'ar mare ma oa dister an ezhommoù kalvezel hag aes-kenañ war ar marc'had kinnig gerioù nevez hep ma ve ret, evel hiziv, ober ha dizober bepred, adsevel hag adkempenn a-raok kavout an termen dik ampleget gant traoù pervezh ar vuhez kalvezel. Hag anat eo e chom bepred brezhoneg ar bobl ur yezh krennamzerel o vont bremañ avat war vreinaat eus an eil bloaz d'egile, ur benveg enta tremen poent dezhañ adsevel e gein, mar fell dezhañ kaout un dalvoudegezh bennak c'hoazh evit remziadoù an eil milved war wel. Hogen seul stankoc'h e vo hiziv niver ar gerioù hag an troiennoù nevez a vo bet arnodet evit dremmañ ouzh ezhommoù ar galvezezh vodern, seul bostekoc'h, hep ket a var, e vo ivez hon lavar brezhonek arc'hoazh. Kement yezh vihan na valeo ket diwar vremañ war an hent a ginnigan

amañ zo tonket dezhi steuziañ. Ha krog eo kalz anezho d'henn ober, siwazh, rak o vervel evel yezhoù nann-kalvezekaet en ur marevezh gouestlet-holl, na petra, d'ar galvezezh, ez eo lakaet dezho mervel evit mat evel yezh na mui na maes, peogwir e vo diaesoc'h-diaesañ, evit kement pobl a zo, bevañ ar vuhez arnevez gant seurt binvioù hag i divarrek d'ober o c'hreskadur kantreol.

Ra vo diskouezet neuze e lakaer un tamm fiziañs e tud evel don, bet savet en ur metou brezhoneger diwar ar maez, hogen bet meizet ganto, dre feuz, abred awalc'h e oa ret ma tistouvje bremañ hent ar yezh poblek war hent bras ur yezh kalvezel arnevez, rak aon na chomje da vougañ en he c'horn hep an disterañ skoazell digant den. Kement-mañ da lavarout n'eo ket ganin e vo disprizet nep troienn boblek bennak pa vo tu d'he c'hlenkañ en ur bozenn galvezel rak, dre c'hras Doue, n'em eus ket ankouaet teodyezh va c'herent !

Skrivañ brezhoneg uhel pe galvezel zo moarvat ur meno diaes da gompren evit tud n'o deus ket prederiet mat war ar gudenn, na dreist-holl poaniet war droidigezhioù diaes evel ma 'm eus-me graet abaoe dau-ugent vloaz. Diarvar eo din avat e vo brasoc'h-brasañ hivi-ziken niver al lennerion a veizo em boa gwelet sklaer em amzer, ha setu perak e kendalc'han d'ober evel ma ran. Hogen kentañ tra din d'ober eo goulenn ouzh nep piv bennak a vefe techet d'am pismigañ hag-efi e vez hennezh o kemer ar boan da lenn ar rolloù-gerioù a gemeran-me ar boan da sevel war-lerc'h kement pennad uhel a skrivan, ma vo aesoc'h d'ul lenner speredet-etre kompren bep tro ar gerioù nevez ? Ma ne ra ket e vo an holl ali ganin evit lavarout ez eo lu ha di-dalvez e glemmicherezh.

JIL EWAN

iiiiiiiiiiiiii

JIL EWAN

BREZHONEG-STUDI

DEK MELLAD AN EMRENEREZH EVIT EUSKADI

Sed amañ da heul an dek mellad o vont d'ober dezvad* an emrenerzh evit Euskadi evel maz eo bet darbennet n'eus ket pell diwar -bouez poblaters*.

1. Rannvroioù Guipuskoa, Alava, Viskaya koulz ha hini Navarra (A) o deus ar galloud, mar karont, da sevel kenetrezo keduniezh* Euskadi.
2. An euskareg, El Euskarra, a gantvezer* evel ar yezh kefridiel*.
3. Pobl Euskadi zo dezhi ar gwir hag an dlead da zilenn he derc'houezerion biaoel evit an Dael Euskarat maz evodo* diouti un gouarnamant euskarat gant galloud-erounit* ha galloud-amaezhiañ* en e gerz.
4. Hec'h amaezhiadurezh dezhi koulz hag be Barnerezh* he devo Keduniezh Euskadi (gant mirout pep doujañs da Vonreizh Spagn).
5. E kerz gouarnamant Euskadi e vo ar veli vrodorel koulz ha reolerezh* an urzh kevredik*.
6. Euskadi a vo mestrez war he c'hellid* ha ganti hec'h-unan e vo graet he c'hemederezh*.
7. Mererezh an Diogelroez Kevredel* a vo reolet gant Ensavadurioù Euskadi.
8. An desavadurezh hag ar c'helenn a vo dindan atebegezh* an Amaezhiadurezh Euskarat nemeti.
9. Heñvelgont evit an derc'haviant*, ar skingomz hag ar skinwel koulz hag evit ar yec'hed, an tirdalc'herezh*, ar pesketaerezh hag ar c'hehenterezh*.
10. Gouarnamant Madrid a lez an nor digor ma vo gallet astenn diwezhatoc'h dezvad an emrenerzh.

Troidigezh kalvezel gant JIL EWAN

Gwelout e-lec'h-all roll ar gerioù diaes

ðððððððððððððððð

Padraig O Conchuir hag Alan Heusaff

KANTVET DEIZ-HA-BLOAZ PADRAIG MAC PHIARAIS

E penn an Iwerzhoniz a'n em savas e 1916 e oa Padraig Mac Phiarais, gwelloc'h anavezet moarvat dre an anv Patrick Pearse. Eñ a voe dibabet da brezidant ar gouarnamant da-c'hortoz a voe diskleriet neuze. Ganet e oa bet d'an 10 a viz Du 1879. Setu ma tegouezhe e gantvet deiz-ha-bloaz nevez zo. Evel ma c'hoarvez e seurt degouezhioù e oa ur mare mat evit adwelout ar pezh a voe graet gantañ, evit "deznannañ" e oberenn. Hag evit lidañ an eñvor anezhañ.

Niverenn miz Du FEASTA, kelc'hgelaouenn Kevre ar Gouezeleg, a zo bet gouestlet da bennadoù diwar e benn. Abaoe deroù ar c'hantved e kemere Pearse perzh oberiant er C'Hevre, o tont da vezañ ezel ar poellgor-ren (pe ar 'poellgor-erounit', mar karit) hag ivez ezel eus ispoellgor an Embannerezh ; ha pennskrivagner An Claidheamh Soluis ("Ar C'Hleze Gouloù") hag a oa neuze kelc'hgelaouenn ar c'henurziadur. Goude-se e troas e breder da grouiñ ar c'hentañ skol iwerzhonek, Skol Sant-Enda, e-lec'h ma lakaas da dalvout e vennozioù diwar-benn an deskadurezh, mennozioù dispac'hel evit Iwerzhon hag a chom raizh c'hoazh evit un darn vat goude tri c'hard kantved. Arc'hanterezh ar skol a zeuas da vezañ ur gwall guldenn. War-dro 1912 ez eas ar stourm evit frankiz ar vro war daeraat ha Pearse a gemeras mui-ouzh-mui

perzh e renerezh an IRISH VOLUNTEERS. E-keit-se holl e oa da vat o skrivañ e saozneg hag en iwerzhoneg, n'eo ket hepken pennadoù-kelc'hgelaouenn ha flemmskridoù met ivez barzhonegoù ha danevelloù.

Bez' e c'haller eta diskouez Pearse e nouspet roll metevit kompren pep hini anezho ervat e ranker o c'henstrollañ en un daolennad vras. En ur barzhoneg e saozneg "The Fool" emañ o keñveriañ e gefridi gant hini un Hader. Setu penaos e c'hallfed ar gwellañ, en ur ger berr, deskrivañ e roll : e pep keñver ez eo bet e obererezh hini un hader. Pobl Iwerzhon e oa an douar ; hag an eost a felle dezhañ dastum a oa, hervez komzoù ar veulbrezegenn a zistagas e 1915 dirak bez ar Fenian O Donovan Rossa : "Iwerzhon dieub koulz ha gouezelek..."Ouzhpenn tri-ugent vloaz 'zo tremenet abaoe : daoust ha c'hwitet en deus ?

BBB

Bez' e c'haller barn diouzh ar seurt berzh a zo bet graet gant an eñvoradur eus e gantvet deiz-habloaz. E derou ar bloaz e oa bet savet ur poellgor gant dileuridi eus a bep seurt aozadurioù sevenadurel ha kuzulioù evit prientiñ displegadegoù a-zoare. Hag ur poellgor all, savet a-berzh-stad, zo bet ivez. Un toulladig mat eus o steuñvadoù zo bet sevenet. Diskouezet ez eus bet pezhioù-c'hoari ha filmoù o tennañ da vuhez Pearse : ur film diazezet war ar buhezskrid gant Ruth Dudley Edwards : "The triumph of failure" ("Trec'hiñ o c'hwitañ"), hag ur pezh-c'hoari gant Eugene Mac Cabe 'zo bet gwelet war skramm ar skinwel. Ur "pageant", - steudad taolenoù istorel gant sonerezh, aozet war ziazez ur skrid gant Bryan Mac Mahon n'eus ket bet kement a dud da zont d'e welout ha ma oad en gortoz.*Ur miz a-raok e oa bet degemeret ar Pab en Iwerzhon en un doare estlammus gant kantmiliadoù a dud, hag e voe anv goude-se e-pad sizhunvezhioù eus e weladenn. E-skoaz

ar bruderezh-se e oa dister an evezh a voe taolet er c'helaouennoù ouzh eñvoradur Pearse. Teskadoù eus e skridoù 'zo bet embannet, ur mirdi 'zo bet graet eus an ti bras e Rath Fearnàin e-lec'h ma oa bet Skol Sant-Enda, un timbr nevez 'zo bet lakaet e gwerzh, prezegenoù 'zo bet distaget da geñver an Oireachtas, - petra c'hoazh?Anv a oa eus un delwenn, da lakaat dirak Burev Bras ar Post e Dulenn, el lec'h ma oa gwechall an Nelson Pillar. Met rendael 'oa a-zivout an dra-se er C'Huzul-kêr. An ez-vaer, perc'henn nouspet tavarn, en doa dismegañset izili ar poellgor -eñvoriñ o lavarout e oa anezho un torkad "Provos", peogwir e oa sinet o anvioù en iwerzhoneg ! Re all a felle dezho reiñ ar plas a enor-se da Jim Larkin, rener ar vicherourion e-pad an harz-labour bras e 1913. Re all c'hoazh 'oa o c'houlenn e vije lakaet eno un delwenn d'ar Werc'hez Vari. Divizet eo bet bremañ pavezañ an takad. Meurdezusoc'h e vo Straed O Connell da welout ! E gwirionez ne fell ket d'an darn-vrasañ er C'Huzul-kêr enoriñ Pearse, evit meur a abeg. "Iwerzhon dieub" a c'hall hiziv an deiz bezañ amster ; Iwerzhon Ouezelek n'eo ket avat. N'eus ket ezhomm eus an dra-se ! Ha d'ur mare ma kenlabour gouarnamant Dulenn gant hini London evit dont a-benn eus an IRA n'o deus ket c'hoant ar pennadurezhioù da enoriñ un den hag a seller outañ evel un atizer-dispac'h, awener ar re a stourm dre heg ouzh dalc'h-idigezh ar C'Hwec'h-Kontelezh, un uhelskouer d'ar Brovisionalel.

Abaoe 1966 ez eus istorourion ha politikereion o strivañ da zispenn brud Pearse e sigur dispenn "gwen-geloù" ("mitoù", - ma komprenit gwelloc'h). Tennet o deus evezh war ar galv graet gant Pearse e derou ar brezel-bed kentañ a-du gant an aberzh-gwad rekiz evit maz adsavfe broioù sujet. Lavaret o deus e vije bet gounezet he frankiz da Iwerzhon hep emsavadeg 1916. Diwar atiz Pearse dreist-holl, emezo, eo ez

eus bet krogadoù gant IRA abaoe ar bloavezhioù ugent - hag e-leizh a dud yaouank iset da lazhañ. Oc'h enorifi Pearse e tegaser dour da vilin an IRA. Eus an dra-se hepken ez eus bet anv ganto. Nebeut a veneg 'zo bet graet eus obererezh Pearse a-du gant an iwerzhoneg, eus e vennozioù a-zivout an deskadurezh. E gwirionez ne fell ket d'ar pennadurezhioù tennañ evezh war an traoù-se kennebeut. Rak kement neuz eus obererezh Pearse 'zo un abeg a nec'hamant, ur strob d'ur Stad ha na vije ket anezhi koulskoude panevet emsavadeg 1916. Prezidant ar republik a yeas da w-lout ar Steudad Taolennoù en National Stadium ha da selaou un nebeut prezegennoù met izili ar gouarnamant o doa holl traoù pouezusoc'h da ober. Pearse en doa skrivet ne vefe ket argaset buan tasmantou broadel Iwerzhon, speredoù emsaverion evel W. Tone, R. Emmet, T. Davis, F. Lalor. Ha dont a ray tagadennoù an "azgwelerion-istor" a-benn da argas tasmant Pearse e-unan ?

Ober eus an ti bras e Rath Fearnàin ur mirdi tra ma lezer ar yezh da zizeriañ 'zo arouezius a-walc'h. An ti bihan e Rosmuc, e-lec'h maz ae Pearse da dremen darn eus e amzer e-doug e vloavezhioù diwezhañ 'zo anezhañ ur mirdi ivez, hag adkempennet eo bet bremañ - pezh a zo reizh. Met ar Gouzelva en-dro da Rosmuc - goude bezañ harzet ouzh ar saoznekaat gant an diarbennoù a reas ar "Stad Dieub" - a ya buan war goazhañ bremañ. Ezhomm a vefe da gemer diarbennoù nevez, dispac'hel, pe e vo aet an iwerzhoneg da get e-touez an dud eno a-benn dibenn ar c'hantved. Ensa- vet ez eus bet ur Bennadurezh ar Gouzelva ha brema- ik, a-raok Nedeleg, e vo dilennadegoù du-hont. Seizh kannad 'zo da vout dilennet ha c'hwec'h ezel all eus ar Bennadurezh 'vo anvet gant Maodiern ar Gouzelva. Un dra dibolitikel e tlee bezañ. Ne vo ket avat : emañ ar strolladoù politikel a-heligenañ o kinnig o "emstriverion". Chom a ray ar "gaeltacht" da c'hast

gant ar bolitikerion. Evel e pep lec'h dre ar bed e vo graet un dra bennak moarvat en anv an "Armerzh" - en anv an danvez ; hag evit ar spered, ra 'n em zibabo, mar gall !

BBB

Ur pennad goude emsavadeg 1916 ec'h embannas Des- mond Ryan, unan eus skolidi Pearse e Sant-Enda, un danevellad diwar-benn ar skol hag e tiskoueze he doa graet berzh. Padal, ar genreizhiad deskadurezh deskrivet gant Pearse en e flemmskrid "The murder machine" ("Ar mekanik-lazhañ") a ya atav en-dro. Kelennet e vez iwerzhoneg er skolioù, met en darn- vrasañ a-bell n'eo mui nemet un danvez-kelenn evel ar re all. Kalz eus an danvez-mistri n'int ket gouest - hag i oc'h echuiñ o studi, da gas da benn un diviz ordinal en iwerzhoneg. Penaos e c'hellfent lakaat o skolidi da dommañ ouzh ar yezh? Kalz eus an abegoù a gave Pearse en ur genreizhiad stultennus ha doñva- us a dalvez atav. Un urzh-kelenn Ar Vreudeur Gristen a zo bet gredus da zeskiñ iwerzhoneg abaoe ur c'hantved. Pearse a oa bet er skol ganto e Westland Row, Dulenn. Met ken strizh e oa o reolennegezh, hag int o vont gwall alies betek reiñ kastizoù korfel kriz d'ar vugale ma ne zeskent ket mat reolennoù di- aes ar yezhadur, ma voe troet kalz anezho a-enep d'an iwerzhoneg evit ar peurrest eus o buhez. Hiziv ne vez ket mui ken garv ar skolaerion met dizesk e chomont ha re niverus o c'hlasoù...

E penn-kentañ ar c'hantved-mañ e renas Conradh na Gaeilge ur strivadeg hag a redias ar Skol-Veur iwerzhonat da reiñ digor d'an iwerzhoneg en he zeir skolaj. Goude tri c'hard kantved n'eur ket aet pell- oc'h ; er c'hontrol, marteze. E Gaillimh e veze kelennet kalzig danvezioù dre an iwerzhoneg tregont vloaz 'zo, hag e reer atav. Met dre ziouer a atiz, a ziskleriadurioù resis, a levrioù, ez eo aet war

goazhañ niver ar studierion oc'h ober o studi dre ar yezh. Un nebeut aotreidi a ra enklaskoù dre an iwerzhoneg, met an ensavadurioù a chom evel ma oant pa voent krouet, ensavadurioù saoz a zeskadurezh uhel

BBB

A-douez an traoù a voe roet atiz dezho gant Pearse ez eo moarvat al lennegezh iwerzhonek an hini a reas ar muiañ berzh. A-drugarez d'an emelloù a oa fiziet ennañ gant Conradh na Gaeilge e oa lec'hiet mat evit diskouez an hent. IMBOURC'H, da heul GWALARN, en deus roet tu d'al lennerion vrezhoneg da dapout un tañva eus e zanevelloù. N'heller ket fougeal ez eo yac'h ha dic'hoantus stad al lennegezh iwerzhonek hiziv an deiz. Keñveriet gant hini ar c'hembraeg ez eo gwan ; e kemm diouzh hini ar brezhoneg hag ar skoseg avat e seblant bout madik a-walc'h (ar pezh a vank - muioc'h eget oberennoù - ez eo lennerion ha tud da breñañ al levrioù !) Gant Pearse eo e voe taolet had al lennegezh arnevez d'ur mare ma talc'he start hengounelourion zo, e Mouan*, dreist-holl, d'ar c'hontadennoù mod-kozh. Bez' ez eus abeg da grediñ e pado al lennegezh-se ha paz afe an iwerzhoneg da get evel yezh pemdeziek ur gumuniezh, - evel teodyezh ur vuhez kevredigezhel dannel pe gloc.

BBB

N'eo ket anavezet mat e oa Pearse a-du gant startaat an darempredoù etrekeltiek. E 1899 e roas harp da aozañ Gouel ar sevenadur iwerzhonek, an Oireachtas. Un eskemm a zileuridi "vreudeuriek" a oa, hag a vez atav, etre Oireachtas Iwerzhon, Mod Alba hag Eisteddfod Kembre. Er bloaz-se e voe anvet Pearse da zileuriad. E Kerdiz* en devoe tro evel-se da we-

lout penaos e veze graet gant ar c'hembraeg war un dro gant ar saozneg en ur skol divyezhek. Ne oa ket techet da dabuta war ul live personel. Ar wech ken-tañ e voe dezhañ bout perzhiek en un tabut foran pa voe tamallet dezhañ gant Iwerzhoniz enep-saoz kavout re a zudi e kompagnunezh Skosiz, Kembreiz ha moarvat ivez Iwerzhoniz habask e-keñver beli ar Saozon. Mat e vefe ober un enklask pishoc'h a-zivout e skiant eus an darempredoù foran a anade evel-se.

BBB

Abeget eo bet e oa douget Pearse da ober re gant an arouezelezh katolik en e varzhoniezh hag en e brederiadennoù diwar-benn ar vroadelouriezh. Gwir eo, met ar skeudennerezh-se a oa koulz ha natur dezhañ. Ha c'hoazh, un doare personel-kenañ 'oa d'e gatologiezh ken e tenne zoken d'ur gredenn brotestant. Gortoz a rae a-berzh an eskibion hag ar peurlrest eus ar gloer e renfent ur vuhez ken divlam hag e hini, ha pa ne raent ket e vezent karezet gantañ. Ar vrud a enep-kloeregezh a c'honezas evel-se a voe dilañsus dezhañ pa zigoras Skol Sant-Enda. Hag ouzhpenn, un deoliezh ken anat hag e hini ne oa ket evit lakaat ar bobl da dommañ outañ. "Pa vez paliou skedus ha santel da dizhout," a lavare dirak bez O Donovan Rossa, "o devez ezhomm eus servij gwazed santel ha skedus." An neuz-se a buritan penn-kil-ha-troad a dalvezas dezhañ tremen e-pad pell, hep dislavar, d'ur sant plastr gant Katoliked Iwerzhon. Ur wech lakaet evel-se war ur sichenn uhel ne voe ket mui c'hoant da gompren ar pezh en doa lavaret na da studiañ e obererezh. Ne gavas lec'h ebet e faltazi ar bobl, evel ma reas R. Emmet pe J. Connolly, da skouer.

Ar c'hantveder-mañ n'en deus lezet roud hewel ebet e buhez ar vro dre vras. Koulskoude, an tagadennoù c'hwerv a zo bet graet ouzh e eñvor hag e zelanvad a ziskouez ivez e chom bev e spered : n'eo ket bet argaset e dasmant. Eñ, pa oa yaouank, a oa bet levezonet-start gant kantveder emsavadeg 1798. Gant ar rendael a zo bet diwar e benn hag en deus talvezet marteze da ziskenn anezhañ diwar e sichenn, tostoc'h da live an dud ordinal, gant ar skridoù diwar e benn pe diwar e zorn a zo bet embannet pe adembannet, e c'heller kaout spi e c'h-lazo adarre an ed en deus hadet.

3 a viz Kerzu 1979

Padraig O Conchuir hag Alan Heusaff

~~~~~

\* Dalc'het eo bet ar "Pageant"-se en National Stadium, e Dulenn.

\* "Munster", e saozneg kefridiel.

\* Me ' gred ez eo meneget na degouezhenn-se e-barzh ISTOR AN EMSAV, embannet gant IMBOURC'H e 1974, kentañ lodenn e teir levrenn.

(Notenn gant Y.O.)

Chom a ra dalc'hmata skouerennoù eus troidigezh Loeiz Andouard eus ISAGAN, dastumad kontadennoù diwar bluenn Padraig Mad Phiarais da werzhañ.

Herve LANNDIERN

E SIGUR PENNAD ISTOR MANTRUS

SANT-ERWAN-AR-VREZHONED E ROMA

Istor Sant-Erwan-ar-Vrezhoned e Roma a zo kentel-ius e meur a geñver. Bez' ez eo bet war un dro santual doujet ur bobl, hag ivez arouezenn he bezañs e-kreiz ar Gêr Beurbad, ken war dachenn ar speredelezh, ken war hini ar politikerezh zoken, bezañs ur vroad balc'h ha nerzhus, oc'h ober berzh hag o c'hoari neuze ur roll pouezus er c'hristenva.

Adal ma paouezas Breizh a vezañ ur Stad riek ha dieub e voe tizhet buan-tre an diazezadur-mañ diwar dastaol an darvoud-se. Seul aesoc'h e c'hoarvezas an dra-se ma oa bet lezet kalz a doullou er feuremglev sinet e 1532 evit pezh a selle ouzh ar frankizioù relijiel, petra bennak ma roe a-hend-all, hervez ar reizh da vihanañ, kalz a warantoù war dachenn ar frankizioù politikel.

Moarvat n'eo ket bet difennet mat ar frankizioù relijiel peogwir e soñje ar sinerion e oanaturar frankizioù-se ha ne oa ket dav ober meneg anezho. Padal, dre an hent-se e krogo ar rouaned c'hall da gacañ ar vroad, dre an diabarzh, war-bouez ober mevelion eus pennadurezhioù an Iliz e Breizh hag

oc'h envel tud emroet dezho er staelioù pennañ ; dre se ez aozent un doare "marc'h-Troia" e diabarzh an Iliz e Breizh. E devoud, pezh a reas Herri da gentañ divodañ Kompagnunezh Sant-Erwan-ar-Vrezhoned ha destagañ he santual ouzh santual ar C'hallaoued e Roma - ha, na petra, ne zisoñjas ketsankañ en e chakod, war un dro, an argouroù bras-meurbet a oa staget ouzh an neved brezhon.

#### Bezañs ar Vrezhoned e Roma

A-viskoazh e oa bet diouzh ar c'hiz ar pirc'hirinajoù e sez an Iliz Katolik e Breizh nemet evit holl vroadoù ar c'hristenva e oa deuet froud ar pirc'hirinajoù-se da vezañ dister-tre da heul an tabutoù etre ar Bibion hag Impalaered an Alamagn, hag ar brezelioù diabarzh o doa gwastet Italia. E-pad ur mare ivez o doa ar c'hroaziadegoù ivez dalc'het evezh ar gristenion gant kudennoù ar Reter, pa oant mennet da zishualañ al Lec'hioù Santel ha bez ar C'hrist e Palestina. Ouzhpenn e oa bet rediet ar Bibion da vont d'an harlu en Avignon, o tilezel ar Gêr Beurbad. Pa voe c'hoarvezet o distro trec'h lidel da Roma e dibenn ar pemzekvet kantved ez adkrogas ar pirc'hirinajoù nerzhus ha buhezek, ha seul vuioc'h a verzh a rejont e-touez ar bobl ma voe diazezet neuze ar Jubileoù.

Mont da birc'hirinañ da Roma er mare-hont avat, dreist-holl eus ur ranndir ken pell ha ma oa Breizh, a oa un avantur wirion, un embregadenn seul risklus-oc'h ma ne gompren ket mat ar birc'hirined o-unan pegen hir e oa an hent o dije da ergerzhout, pebezh diaesterioù en em gavje dirazo, pebezh dañjerioù a vije ouzh o gortoz, ken a-berzh al laeron war an hentoù, ken a-berzh ar c'hleñvedoù. Kalz a yae kuit hep kaout a-walc'h a arc'hant ; o stad e Roma, dreist-holl hini ar re baour, a zeue a-wechoù da vezañ

tenn-tre ha mantrus zoken. Ret e oa pourveziñ dezho lojeiz ha boued, o frederiañ pa vezent klañv, hag a-wechoù diogeliñ dezho ur sebeliadur kristen. Dav e oa ivez pourchas dezho ur sammad arc'hant evit beaj an distro, betegout na varvjent gant an naon war an hent. Klask a raio ar Bibion sikour ar birc'hirined dispont-se, difur eveljust, hag alies enket en ur saviad arvarus ; hogen anat eo ne oa ket a-walc'h danvez ar Bennbeleion evit dienkañ ar re-mañ hag hep dale e vo degaset ar broadoù katolik da adsevel o herberc'htioù kozh ha da sevel re nevez, -Spagnoliz, Teutoned, Bohemiz, Saozon, Svediz, Gallaoued, Slaved hag Abisiz, Katalouniz, Hungariz, Flamanked, Armeniz ha Suisiz, Gresianed ha Poloniz, Albaniz ha Skosiz, - en ur ger, kevredad an holl vroadoù kristen : pep hini anezho he devo evel-se un ti kefridiel met nebeut-tre eus ar pobloù-se a zlee en em gavout a-raok ar Vrezhoned evit diazezañ ur seurt herberc'hti broadel rak ar re-mañ o devoa o hini e Roma adal 1455. E gwirionez, broad estren ebet n'he doa vuioc'h a zileuridi e Roma, ha da gement-se e oa meur a abeg : diouzh un tu, Breizh n'he doa sinet morse gant ar Sez Santel keduniad ebet o tiazezañ, evel e Bro-C'hall un doare Iliz emren mui-pe-vui, o vouzhat mui-pe-vui ivez ouzh beliezh Roma ha mui-pe-vui sujet d'ur roue 'hoalek'\*. Breizh a chomo ur vro a sentidigezh ouzh an Iliz, un douar a Iliz, da lavarout eo e oa melestret war-eeun gant Roma hag a zalc'he da envel degemererion ar 'buzadoù', evit an div drederenn anezho da vihanañ : ar Pab a zeroe an holl vuzadoù diberc'henn e-pad eizh miz eus ar bloaz (an daou viz kentañ eus pep trimizvezh ; ober a raed anezho 'mizioù ar Pab') ; an eskob a anve e zegemererion-eñ e-pad ar pevar miz all, da lavarout eo miz diwezhañ pep trimizvezh a zouge e anv ; hag adal ar XVvet kantved e-pad c'hwec'h miz hervez divizoù zo : houmañ a oa lezenn ar 'bebeiliez'.

Ar sujedigezh-se war-eeun, a c'helle seblantout bezañ destrishus d'ar c'hentañ sell, a oa e gwirionez ur gwarant evit dizalc'hded ur vroad vihan a vije bet lonket ken buan all gant hec'h amezeion eus ar reter d'ur mare ma oa diazezoù politikel ha relijiel ur Stad klenket don ha nes an eil re gant ar re all, - ha se, forzh penaos ne lame ket diouzh an Iliz e Breizh he doareoù piauvel hag orinel. Eveljust e c'houlakae ar saviad diseurt-se e vije en em gavet e Roma un niver bennak a hanterourion gefridiel etre ar c'houlennerion vuzadoù hag amaezhierzh ar Pab : prokulored, notered, bankourion h.a.

Un abeg all a ziskleir perak he devoa Breizh darempredoù tost-tre gant ar Sez Santel. D'ar c'houlz-se e oa douget da Vreizh en un doare ispisial-tre lignez ar Bibion okitanat a savo neuze an eil warlerc'h egile war dron Sant-Per ha dreist-holl Klemañs VI bet ganet gwaz d'ar Ried Vrezhon dre froudenn an Istor. Da heul eured Arzhur II gant Mari a Limoj en em gavo al Limouzin stag ouzh Breizh ha Klemañs VI, da vare santeladur Sant-Erwan, a denno ampled, lorc'h ennañ, eus e ditl a Vrezhon. E 1447 ez anzavo diouzhtu ha da vat Yann IV a Venezkreñf evel Dug Breizh nemetañ ha diles.

#### Iliz Sant-Erwan-ar-Vrezhoned

An drevadenn vreizhat e Roma a biaoue dija er XIVvet hag e deroù ar XVvet kantved meur a leti e-lec'h e c'helle pirc'hirined ha klañvourion bezañ sikouret met tamm iliz arbennik ebet. Abaoe pell e c'houlenne ar Vrezhoned un neved broadel. A-benn ar fin, a-drugarez da zifraeoù ar C'hardinal Alan a Goetivi - a oa gwelet mat-tre gant ar Pennbeleg, e tizhe ar Vrezhoned kaout digant ar Pab Nikolaz V, d'ar 24 a viz Gwengolo 1454, perc'hentiez an iliz kozh Sant-Andrev-de-Marmorariis, war ribl kleiz ar

stêr Tevere, un nebeut kammedoù diouzh ar stêr hec'h-unan, etre ar Via Ripetta hag ar Via Scrofa, nepell diouzh ar c'hCorso, hag ar roadur-se a voe kaougan-tet hep dale gant e warlerc'hiad, Kalikstus III, Alfonso Borgia, ha na oa ket gouest e gwirionez da nac'hañ netra ouzh ar C'hardinal breizhatma oa dleour dezhañ, evit ul lodenn vat, eus e zilennadur. War un dro, an tiez-skoazell breizhat kozh, a oa skignet e meur a garter eus kêr, a vo dilezet hag un herberc'hti broadel a vo kempennet war-dro ar santual.

An herberc'hti Sant-Erwan-se gant e iliz a voe roet dezhañ un argouroù, ennañ ul leve digemm ha fonnus, a lakae anezhañ er c'hentañ renk e-touez an tiez-skoazellañ a seurt gantañ. N'omp ket gouest da reiñ ur sifr resis met uhel-tre e tlee bezañ peogwir e tenne mad hon herberc'hti broadel, d'ar mare ma voe staget ouzh Sant-Loeiz-ar-C'hallaoued, eus ur c'horvoder a 7.000 skoed roman.

Ar penniliz kehelus-se, sant-Andrev, deuet da vezañ Sant-Erwan, a sav an orin anezhañ betek an IXvet pe zoken, an VIIIvet kantved, ha gwechall e oa bet neved breuriez c'halloudus ar Marmorii, arzourion war ar marmor hag ar mozaikennoù e Roma ; d'ar re-se e oa dleour an iliz eus he favezioù kaer, eus ar re gaerañ e kêr Roma e gwirionez, - nemet dilezet e oa bet abaoe remziadoù ha pa oa deuet da vezañ perc'hentiez ar Vrezhoned e oa dizalbadet a-grenn: "desolata, collapsa et ruinosa..."

Ar Vrezhoned o doa adaozet da gentañ ar pep mal-lusañ ha ne grogjont da adsevel an iliz nemet goude ma voent asur e c'hellje padout an herberc'hti. Ar Vreuriezh Vrezhon a blede gant mad ar Vrezhoned e Roma n'he doa graet neuze nemet daskemm un nebeut: munudoù, dreist-holl o stagañ ouzh an iliz ur chapel a oa dediet da Santez Anna.

Ne voe echu an adsavadur nemet e 1568 a-benn ar fin. Breizh, a-benn neuze, he doa kollet he dishualded nemet e oa mestrez a-walc'h war he zonkadur evit perc'hennañ e kêrbenn ar bed kristen hec'h iliz vroadel hag hec'h adsevel en un doare dispar evel m'hen diskouez an enskrivadur-mañ a voe lakaet a-us d'an nor-greiz da zeiz digoradur an iliz :

DIVO IVONI TRECORENSI PAUPERUM  
ET VIDUARUM ADVOCATO NATIO' BRITANNIAE  
AEDEM HANC JAMPRIDEM CONSECRATAM  
RESTAURAVIT ANNO M DL XVIII

Pezh a dalvez :

Broad Vreizh a adsavas er bloaz 1568  
an iliz-mañ dediet abaoe pell  
da Sant Erwan a Landreger,  
breutaer ar beorion hag an intañvezed.

An iliz-se a oa aet da get ha pep roud anezhi a oa bet diverket. Dre zegouezh ha gant sikour Doue e voe dizoloet a-benn ar fin an tres hag an deskri-vadur anezhi.

Ar savadur-se a oa dezhañ 28 metrad hed ha 12 metrad led, ha dezhañ e oa stumm ur penniliz kentidik, hag eñ harpet gant eizh piler, pemp e greunvaen ruz, daou e greunvaen louet hag unan e kipolin. Kinklet e oa ar pennaoter, lec'hiet e penn pellañ an diadrenñ, gant un daolenn o tiskouez Sant Erwan goursavet. En e gichen ur goulm c'houlaoek livet gant Jakez Triga, hag a oa mennet da skeudennañ emichañs arvest ar burzhud danevellet gant unan eus an testoù er prosez santeladur, Olier Lannuig. Kerz a zo ivez eus un dornskrid e-lec'h emañ treset pavadur an iliz, kozh ha brudet en abeg d'e vozaikennoù.

### Ur WESTMINSTER evit ar Vrezhoned

E 1638, diwar c'houlenn Brezhoned Roma, o doa eskob Landreger ha bodad e chalonied enorus, graet donezon eus ur relegenn heverk eus Sant Erwan evit ma vijê miret "e-barzh an iliz a zo piaouet gant broad ar Vrezhoned e Roma..." Dalc'het e oa ar relegenn-se e-barzh ur brusklun e prenn alaouret eus ar Sant. Ar C'hallaoued o deus skrapet ar relegenn-se hag e zerc'hel a reont e-barzh "Teñzor Sant-Loeiz-ar-C'hallaoued". Bez' ez eus anezhi ur brusklun meurdezus-eston hon eus gellet arvestiñ outañ nepell 'zo, paz omp tremenet e Roma.

Muioc'h eget neb iliz all e Breizh hec'h-unan e tiskoueze Sant-Erwan-ar-Vrezhoned bezañ un neved broadel. Un dornad eus hor c'henvroiz brudet en o amzer ha genidik a bep seurt kornioù eus hor bro en doa fellet dezho bezañ beziet eno, evel Herri Guihirreg, arc'hdiagon Kernev ha dean ar Werc'hez, war harzoù Breizh, Jakez a Bontkoedig, selaouer e Lez-Varn ar Rod, Per Amect, chaloni e Roazhon, Yann Channe, Per Raigot, Anton Barbuti (an hini barvek), Jakez Lebret, - e-tal estrañjourion, Spagnoliz, Italianed, Poloniz, Gallaoued, a oa bet degaset da c'houlenn an hevelep brient diwar o deoliezhoù ouzh Sant Erwan.

### Parrez Sant-Erwan

Dre ma teue dezho an neved-se da hêrezh e tizhe ar Vrezhoned ivez ober o mad eus ar perzh parrez a oa da iliz Sant-Andrev-de-Marmoris.

Ar Pennbeleg Kalikstus III en doa aotreet d'ar Vreuriezh vrezhon ar gwir da envel ha da zizorniañ "ad nutum", da lavarout eo, evel ma kare, personed ar barrez nevez a voe dibabet alies e-touez kloer vrezhon daoust ma ne oa ket ar barrezianiz Brezhoned



(e devoud en em gavas kerkoulz Italianed ha Spagnoliz e penn ar barrez). Dalc'het e vo soñj eus Frañsez Lasciver (pe : 'Larchiver') a oa e Roma da geñver Jubile Meur 1600 hag a ziskoueze bezañ gouest da glevout e kofez ar birc'hirined vreizhat diniver a oa deredet da Roma er bloaz-se. Ken gredus e oa ma voe anvet da eskob Roazhon gant ar Pab klevet anv gantañ eus e nerzh-kalon. Pa varvas e oa dezhañ brud ur sant. Dalc'het e vo soñj ivez eus anv Paul Fabiani a voe, e 1824, diwezhañ person ar barrez vrezhon bet divodet gant ar Pab Leon XII er bloaz-se : padet he doa 369 bloaz.

Unan eus ar bersoned all, Per Chevet, a embannas e Roma, en XVIIIvet kantved, ur buhezskrid eus Sant Erwan en italianeg, un oberenn ha n'eo ket dizudi, nemet a zo strobet gant sarmonioù ha prederiadennoù diziwezh. Dom Chevet, war a seblant, en deus bet dindan e selloù un dornskrid eus an enklask renet e sell lakaat Sant Erwan war roll ar Sent, un dornskrid a steuzias kuit e 1799, pa voe preizhataet Roma gant ar C'hallaoued (heñvel e oa ouzh an hini a zo bremañ e Sant-Brieg hiziv an deiz).

#### Kompagnunezh Sant-Erwan

Lavaromp bremañ ur ger bennak evit diskouez penaos e oa urzhiet "Kompagnunezh Sant-Erwan" e Roma ha perak e oa anezhi ur c'hevredad nerzhus. Notomp da gentañ ez eo ret diforc'hañ ar "gompagnunezh" diouzh "Breuriezh Sant-Erwan", diazezet e 1513 gant Leon X, hag a oa dezhi ur pal disheñvel-krenn peogwir e oa anezhi ur c'hevredad speredel-rik.

Da gloer an Amaezhva\* a vroadelezh vrezhon eo en doa Kalikstus III roet iliz Sant-Andrev p'en devoa aotreet dezho sevel ur "gompagnunezh" evit urzhiañ ha melestrañ herberc'hti Sant-Erwan. Renet e oa gant daou 'brokolor' pe 'reizhour' dilennet evit ar bloavezh, unan anezho o vezañ derc'houezer Gorre ar vro

hag egile hini ar Goueled ; ar re-mañ a zalc'he kontoù diforc'h a veze gwirieket gant daou pe dri selaouer evit pep yezh, "an hini gallek hag an hini arvorigek..."

Ar "Gompagnunezh" a oa ur c'hevredad a genskoazell etre hec'h izili a roe sikour dreist-holl d'ar genvroiz vrezhon a gave bod en he herberc'htioù. Lec'hiet e oa eus ar gwellañ evit kemer ur perzh oberiant e leviadur ar gristeniezh en ur zifenn gwirioù dibar ar vroad vrezhon. Setu petra 'oa palioù ar c'hevredad-se a voe splann an doare broadel anezhañ. Bepred a-hend-all e ra ar "gompagnunezh" gant ar ger "broad".

Adal m'he deus lakaet e stad mat a-walc'h ar penniliz kozh e laka enskrivañ a-us d'an nor-borched "Broad ar Vrezhoned he deus adsavet an adeilad-mañ." Da re baour ar vroad ez eo mennet an herberc'hti ; d'ar gouelioù bras e vez kinniget an oferenn evit an Iliz, ar vroad hag ar vadoberourion ; gant pedennoù foran e c'houlenner ma raio berzh "Dugelezh Vreizh."

Evel-se 'ta, evel e Polonia, evel en Iwerzhon ez eo kadarnaet e Breizh an unaniezh don etre ar garantez evit ar vro hag ar garantez evit ar relijion.

Enor, lorc'h ha dellid Pobl Vreizh a vez diskouezet dre lidoù meurdeuzus e-lec'h en em gav kej-mesk an estrenion gant hor c'henvroiz : ken bras e oa brud lugernus hor sant broadel a oa en em astennet penn-da-benn d'ar c'hristenva.

BBBBBB

Adal deroù ar XVIvet kantved e vez kanneulet Sant Erwan gant an holl dud a lezenn eus an holl vroioù evel o sant paeron. Da geñver gouel ar Sant e vez kinklet an iliz gant ardamezioù ar Pab ha re Vreizh;

tregerniñ a ra ivez gant tonioù lazoù-kanañ Chapel Sikstus deuet gant lid bras, tra ma tassion trompilhoù ar c'hapitol oc'h ambroug al lidperzhidi dremaz eont e-barzh an iliz pe ma teuont er-maez, e-kreiz an etivi-goulaouiñ o flamminañ...

Hag int lodek e buhez kêr, e redadegoù hag e c'hoariadegoù an Ened n'o doa ket ar Vrezhoned o chom e Roma dilezet netra eus o gizioù broadel ha n'o doa ket kroaziet peurgent war o embregerezh ar muiañ prizet dezho : ar gouren. Evel-se e lennomp e-barzh "Mélanges d'archéologie et d'histoire" ("Skridoù mesk-ha-mesk diwar-benn hendraouriezh hag istor") penaos ar "Gompagnunezh" he doa kemeret da zlead bevañ hep astal daou c'hourener, "ma samme warni ouzhpenn ar mizoù evit o gwiskañ : porpant mezher gwenn, tog, gouriz seiz, ur re vanegoù hag a-hend-all tri c'habell, an trede emichañs evit an hini maz ae ar maout gantañ ; un adverenn war-vaez a zeue da heul ar gevezadeg..."


Lenn a reer e-barzh ar 'Mélanges' :

"Kiriek e oa bet an herberc'hti da savidigezh ar "Gompagnunezh" ; kraonell ar 'vroad' e oa. Gant an herberc'hti e oa reizhwiriekat bezoud ar 'Gompagnunezh' ; gant an herberc'hti ivez e voe prederiet dalc'hmat houmañ hag un enor ez eo bet eviti bezañ chomet feal bepred d'an dlead-se..."

Ur beleg paour a zo lojet e-barzh an hini wellañ eus ar c'hambroù, dezhañ da garg diwall d'an davan-teion kavout degemer kerkoulz ha kement hini a c'houlennno ur gwarez bennak. Evel-se eo e kavas bod en herberc'hti e-pad goanvezh 1567 dimezelled eus an noblañs a Leon deuet betek ar Gêr Beurbad gant o mitizhion.

Hag int atebek eus kement a selle ouzh mad spere-del parrez kozh Sant-Andrev ma oa deuet dezho ar garg anezhi dre hêrezh e pourveze ar Vrezhoned hep

Diabarzh chapel nevez Sant-Eruenn  
ar Vrezhoned kent na voe distrujet





Bez ar C'hardinal Alan Coetivi

Heun-bez Jakez Penncoedic hag Herve Guhriec



bezet bremañ e kloastr  
Sant-Loeiz-ar-C'hallaoued



Iliz, prestital hag herberc'htl Sant-Erwan  
ar Brezhoned en XIXvet kantved



Kelc'h kristen eus ar c'hontadour  
kentan a gunkle gwechull ralsal  
prestital Sant-Erwan-ar-Brezhoneg

kontañ da ezhommoù ar barrez-se ha gouestlañ a raent a-wechoù hogos an div drederenn eus o dispignoù bloaziek da ober war he zro.

Evit talañ ouzh an endalc'hadurioù-se e piaoue ar "Gompagnunezh", gwir eo, en tu-hont d'an diazeza-dur orin bet profet gant ar Ried Vrezhon (gwelet hon eus pegen pouezus e oa) leyeoù all o tont diwar feurmiñ un toullad tiadurioù a oa stok-ha-stok an darn-vuiañ anezho ouzh an iliz pe en tu all d'ar Vicolo della Campana ; war a seblant zoken e oa ar feurmou-se er XVIvet kantved ar pep pennañ eus he c'horvoder. Un toullad notered a oa karget da sevel ar c'hevratou-feurmiñ, hag ar re-se a oa Brezhoned.

Penaos ez echuas KOMPAGNUNEZH ar Vrezhoneg

Kevanet e voe Dugelezh Vreizh ouzh Rouantelezh Vro-C'hall e 1532. Grataet o doa ar Ried C'hall, gant lid bras, derc'hel en o sav an ensavadurioù brezhon, met gouzout a reer petra a dalveze evit ur C'hapetaf hevelep promesa !

Lenn a reomp e-barzh ar 'Mélanges' :

"Aozet e vo politikerezh ar rouaned c'hall penna-da-benn evit unvaniñ dezvad kloer ar rouantelezh hag o vont donoc'h, evit strishaat riegezh ar Penneleg Roman. Dre se ne oa mui abeg ebet da duta Brezhoned evit an Amaezhva Roman A-ziagent en doa tapet Frañsez Iañ digant ar Pab Leon X ar gwir da envel ar re a garfe e penn an eskoptioù hag an abatioù ; hag an amzer a zalc'he d'ober he labour.

E Roma ne chome mui e "Kompagnunezh Sant-Erwan" nemet un nebeut dreistveverion ; dreistpadout a rae ar "Kompagnunezh", nemet o krakveañ, poan vras warni. E 1582 e c'houlennas Herri III digant Gregor XII na vije mui hiviziken nemet ur "Kompagnunezh" : hini "Sant-Loeiz ha Sant-Erwan"..."



Ar Pab en doa grataet en e siellizher eus an 12 a viz Kerzu 1582 'e-lec'h e fellas dezhañ rentañ enor da feiz nerzhus ar Vrezhoned' e teufe Brezhoned tre e Kuzul ar Gompagnunezh nevez ma tlee an ardamezioù anezhi bezañ re Vreizh ha re Vro-C'hall, hanter hag hanter, tra ma vije bet lakaet an div Iliz tost da vat war ar memes pazenn, hogen, e devoud, e voe lamet anv 'Kompagnunezh ar Vrezhoned'. D'ar 27 a viz Mae 1583, Krieriad Sant-Loeiz-ar-C'hallaoued a biaoue holl vadoù ar Gompagnunezh Vrezhon ; ne oa mui anv eus ur c'hevredadur, - eus un diberc'hennadur, ne lavaran ket. E 1692, evit merkañ sujedigezh ar vroad valc'h e oa bet Breizh e vo adaozet lein lambrusket iliz Sant-Erwan ha kinklet e vo gant livadurioù ma vo kavet enno kichen-ha-kichen flourdiliz Bro-C'hall a bep eil gant erminigoù Breizh, tra ma vo treset e-kreiz an nev bras skoed ar Roue Gall gant sifr Loeiz XIV.

#### Penaos ez echuas iliz Sant-Erwan-ar-Vrezhoned

Daoust m'he doa iliz Sant-Erwan-ar-Vrezhoned degaset d'ar c'hrieriad gall leveoù bras-meurbet e vo gwalleget gant hemañ dizamant-kaer a-c'houdevezh Dija er XVIIvet kantved e vo rediet Breudoù Breizh da gempenn diwar o yalc'h ar pezh a oa da aozañ en iliz. Ur wech ma vo divodet ar Breudoù gant an dispac'herion c'hall e dibenn an triwec'hvet kantved e vo dilezet an iliz-se penn-da-benn gant an amaezh-ierezh gall daoust ma oa an traoù mat-tre ganti e-keñver arc'hant ha daoust maz enebas alies ar Bibion hag int kounnaret o welout hevelep difoeltre, - hag ivez, eveljust, ar Vrezhoned o-unan, met petra a dalvez ar gwir hep nerzh ebet evit ur Stad ha n'he deus komprenet a-viskoazh nemet an nerzh ?

An holl birc'hirined vrezhon eus an XIXvet kantved, adal Sigismond Ropartz e 1851, betek Guillotin de Corson e 1866, a ra meneg eus dilezidigezh ha dismantridigezh an iliz.

Erfin, e 1875, e tisklerias gouarnamant Viktor-Emmanuel - na oa ket ken damantus hag hini ar Bibion - e ranke ar c'hrieriad gall adsevel iliz Sant-Erwan a oa deuet da vezañ un dañjer er stad m'edo erru, pe neuze diskar anezhi penn-da-benn. Ar c'hrieriad a zibabas an eil mennad daoust m'o doa kelaouennoù roman zo enebet taer outañ, hag int oc'h ober vandaled ha barbared eus ar C'hallaoued en degouezh-se, un anv ha n'eus ket peadra da dennañ lorc'h dioutañ. Hogen kement-se ne gemmas netra en afer ha diskaret e voe an iliz gant pigell ar freuzherion.

"E-pad pell amzer c'hoazh e klasko ar pirc'hirin brezhon-dizoleiñ war ribloù an Tevere dilerc'hioù an neved-se ken tost d'e feiz ha d'e vrogarouriezh. En aner e klasko : pep tra a zo steuziet..."

#### Chapel Sant-Erwan

Ne chomo netra breizhat koulz lavaret er chapelig dister a vo savet a-c'houdevezh, evit darn gant un dafar o tont eus an iliz kozh, en ur gornblegenn eus ar Vicolo della Campagna.

Ma oa tu da welout c'hoazh eno skeudenn Sant Erwan e oa dalc'het diadrefiv ar chapel penn-da-benn gant delwenoù sent a Vro-C'hall : Sant Marzhin ha Santez Klotilda, hag en tu all : Sant Loeiz, Sant Bernez, Santez Jenovefa ; liv ebet eus hor Sent kozh a oa bet "disonjet" penn-da-benn.

E-giz ma oa e voe kavet ar vezañs-se, al lec'h emvod-se, dihetus c'hoazh d'ar C'hallaoued. Nevez zo o deus ar pennadurezhioù gall lakaet diskar anezhañ. Ne chom mui nemet an talbenn. An dachenn avat a zo bet gwerzhet evit izelbriz d'an adeiladaozerion roman.

12 a viz Kerzu 1979  
Da zeiz gouel Sant Kaourintin  
ha Yann-Vari Perrot

Herve LANNDIERN

Ar pep pennañ eus ar studiadennoù hag ar menegoù 'zo bet tennet eus oberenn ar chaloni Hollsent ar C'hog : "Sant-Erwan-ar-Vrezhoned e Roma" embannet e Sant-Brieg, e ti Prud'homme, e 1947.

KOZHARZH

ISTOR AR VRO PE ISTOR AN DUD ?

Daou zoare ez eus da gontañ an istor : kontañ istor ar vro, pe gentoc'h, istor kement pobl he deus bevet en ur vro, pe neuze, kontañ istor ur bobl e kement bro m'he deus bevet enni.

"Istor Breizh", "Histoire de Bretagne" n'int ket talbennoù peurreizh evit levrioù a gont dimp doareoù henvarevezhiz ar maen el ledenez-mañ, p'emañ diskenidi an dud-hont o vevañ bremañ e Laponia marteze. Ha pa gontont istor gallegion Breizh n'int ket resisoc'h kennebeut, dre maz eo Breizh glad ar Vrezhoned, ha ne grog Istor Breizh nemet pa vez anvet Breizh gant ar Vrezhoned o tont eus Breizh-Veur, - ha c'hoazh e lavarfen ez eus endeo eus ar Vrezhoned hag eus Breizh pa grog tud o chom en Enez Preden da vezañ anvet Brezhoned gant an dud all o c'hav disheñvel diouto o-unan. E gwirionez, istor he yezh eo istor ur bobl, dre maz eo ar yezh a ra mab-den, ha dre maz eo ar yezh disheñvel a ra tud disheñvel.

Ha ma teufe tud al ledenez-mañ da vout gallegion, e vefe direizh ober anezho "Brezhoned" hag eus o bro "Breizh" pe, zoken "Bretagne" !

KOZHARZH

~~~~~

A-DREUZ LENN

BUHEZ MIKAEL AN NOBLETZ. Misioner Breizh-Izel. Plouguerne (sic) 1577-1652 Konk-Leon. Doue d'e bardono. Strollad ar Bro-Bagan. 1978. E sapientia Domini.

Hemañ a zo talbenn an dornskrid - pe, da vihanañ, an eilskrid anezhañ, am eus bet tro da lenn (ha zoken, da adlenn). N'emañ ket ganin an doare a zo bet embannet gant Yod-Kerc'h avat. Kont a zalc'hin hepken enta eus ar skrid am eus-me lennet.

Grataet em boa barn an oberenn-mañ ur wech ma 'm bije bet tro d'he lenn. Setu, lennet hag adlennet eo bet ganin ha gouest e tlefen bezañ da lavarout ur ger diwar he fenn.

Da gentañ e lavarfen n'eo ket ar pezh-c'hoari-mañ ur skrid lennegel e nep doare. N'eus unded ebet enni - n'eus preder ebet enni. Dre ziv wech e tezeveler deomp buhez Mikael an Noblez (pe kentoc'h, bruzhun istor diwar e vuhez, hep penn na lost avat) hag istor an Tad Maner staget war-lerc'h n'he deus netra da welout - er pezh-c'hoari - gant hini Mikael an Noblez.

Lavaret em eus ne oa preder ebet er pezh-c'hoari. E gwirionez ez echu e-giz ur flemmskrid a-enep d'an Iliz dre vras, ha c'hoazh ez eo ur flemmskrid gros a c'hoarvez dreist-holl eus garmadennoù ha luganoù ha na weler ket mat gant petra e klotont. Lavaret eo bet gant Yann Brekilien war vBREIZH e tenne an oberenn-mañ d'un abadenn sirk ; prest e vefen da

soñjal e tenn kentoc'h d'un 'dibunad' eus Raymond Collaro er skinwel gall : al live n'eo ket kalz uheloc'h. Ken intret eo yaouankizoù ar C'hwec'hkogn gant ar skinwel gall ma c'hellfe aozerion an abadenn-mañ bezañ bet levezonet hep gouzout dezho !

En em c'houlenn a ran, evit bezañ reizh, ha n'eus ket un eñvorad bennak - muioc'h emskiantek moarvat - diwar Gorsedd-Digor pe Nominoe-Oe e-barzh ar pezh-c'hoari-mañ (nemet e vefe hini ar Bourgeois Gentilhomme rak un tamm deskadurezh c'hallek a zle kaout evelkent aozerion ar skrid-mañ) ma tezvarnan diouzh implij ar brezhoneg beleg pe ar galleg a gaver en oberenn.

Padal, dre vras, e soñjfe unan ez eo bet Mikael an Noblez un devert-amzer - berrboell a-walc'h - evit tud yaouank a garfe diskouez marteze ez int 'dieubet' mat. Egwirionezn'em eus merzet mennad re-sis ebet en oberenn, zoken a-enep d'ar veleion ha d'an Iliz (re izel eo live an oberenn) nemet o deus bourret an aozerion o silañ er pezh-c'hoari 'erouez-adoù' a bep seurt, o tennañ da zardvoudoù a hiziv pe da dudenoù eus an emsav (hor paour-kaezh emsavig a hiziv, ya), adal al 'lanv du', betek ar Chaloni Falc'hun pe Visant Seite, hep kontañ ar 'Bleun-Brug (pehini ?) an UDB, ar CRSed ha me 'oar-me, ha kement-se kej-mesk, hep urzh na poell ebet. Penaos e vefe tu da varn hevelep meskaj ?

Rak setu dres an dalc'h : ne c'heller ket lavarout zoken ez eo bet savet ar pezh-c'hoari a-ratozh evit dismegañsif Mikael an Noblez hag an Iliz, ken gros ez eo ar farsadenn. Met marteze ivez ez eo hevelep difoeltre gwashoc'h eget ar youl da dagañ a-berzh enebourion. Aozerion ar pezh-c'hoari ne ouzont netra diwar-benn buhezwirion. Mikael an Noblez pe, dre maz int digristen dres, n'o deus komprenet netra enni. Koulz e vije bet dezho sevel ur pezh-c'hoari

diwar-benn ur 'samourai' eus krennamzer Bro-Japan rak ne vije ket bet seurt testenn estrenoc'h eget an hini o deus dibabet evit o 'fezh-c'hoari'. Hogen adarre : daoust hag un difoeltre a seurt-se n'eo ket grevusoc'h eget ur youl emskiantek da zismegañsif a-berzh enebourion ?

Lakaet em eus 'pezh-c'hoari' etre askoù rak e gwirionez, bez' ez eo an oberenn-mañ kentoc'h ur 'show' skinwel eget n'eus forzh petra all, ur 'show' a garfe bezañ politikel, daoust m'en em c'houlennan petra a zo politikel, marksat pe sokialour, er c'hunujenoù a zo dislonket en diwezh ouzh an Tad Maner. Kunujennif n'eo ket barn hag an aridennadoù kunujenoù a vez eneoüs a-benn ar fin. Moarvat, gant ar c'hoari gouleier, an dilhad, ar maskloù ha me 'oar-me e c'hell ur pezh-c'hoari tremen dreist d'an aspled, evel ma lavar ar C'hallaoued hogen bez' e ra neuze e-giz ma rafe dres un abadenn sirk.

Diwar-benn ar yezh n'eus ket kalz tra da lavarout. Bez ez eus anezhi ul leoneg a glask bezañ poblek (gant pevar pe bemp ger hag un toullad bommoù gallek e teuit a-benn bepred da reiñ un tamm livaj poblek d'ho prezhoneg) nemet laosk ha paour bominab 'keta, e chom ur seurt yezh dre vras. Evel m'em eus displeget endeo, n'eo ket sur e c'heller kinnig d'ar bobl e brezhoneg, er stad m'emañ ar yezh e genoù ar re he c'homz c'hoazh, oberenoù talvouduse vefent gouest d'intent! Rak-se ez eo tentet bepred ar saverion pezhioù c'hoari brezhonek da fardañ bourdoù gros, ar re nemeto a c'hellfe dedennañ ur foran a oar kalz mui a c'halleget eget a vrezhoneg hiziv an deiz. Ivez, daoust ha tu a zo da gefñveriañ niver an dud a bleustr ar c'hoarivaou hag ar fiñvskeudenndioù gallek ouzh ar re a ya d'an abadennoù brezhonek a seurt-mañ zoken ? petra ' fell deoc'h ! Er mare-mañ, ar galleg an hini eo a zo ledet e pep lec'h e Breizh a-bezh, ar

galleg an hini a zo poblek, war wall enebourion hor yezh. Stourm a reomp evit ma teuio ar brezhoneg da vezañ poblek e Breizh. Met ret eo bezañ kalonek a-walc'h evit anzav ne ra hon emgann nemet kregif ha n'eo ar brezhoneg ur yezh e gwirionez nemet e diabarzh an emsav.

N'ouzon ket perak e kendalc'h yaouankizoù zo da huñvreal diwar-benn un tremened n'eus ket mui anezhañ : tremenedelourion, 'paseisted' n'eus ken anezho, a-benn ar fin. A-hend-all, ma fell dezho didouellañ ar bobl diwar-benn relijion, n'eo ket dav dezho en em skuizhañ ha koll o amzer : al labour a zo bet graet propik gant ar C'hallaoued, hag e galleg, a bell zo !

Y.O.

%%%%%%%%%

GERIOU DIVOUTIN (kendalc'h ar bajenn 28)

ISKENDERC'HAD/sous-produit. LIZADUREZH/corruption. lambrusket/lambrissé. MAGEREZH/élevage (ivez:SAVE-REZH).MILOUREL/militaire. NEVED/sanctuaire. ORINEL/original. PIAOUEL/propre. POBLATERS/référendum.PELL-DISKELATAEREZH/télé-détection. POZENN/phrase. RANNUJ/division. REIZHPOELL/logique. REOLIN/contrôler.REVEL/sexuel. SAVIA,D/situation. SIOC'HANEREZH/avortement. SPISWELDED/clairvoyance. STEUNV/programme,plan. STUZEGEZH/culture (moeurs etc). TEODYEZH/dialecte. TIR-DALC'HEREZH/agriculture ster ledan). Ivez : GOUNEZE-REZH. TREC'HLIDEL/triomphant. TRONKEREZH/travail du sol. UNREZEKAUS/uniformisant. UNVEZ/unité.

~~~~~

Moulet gant ar gelaouenn

Ar rener:Y.Ollivier

CPAPP:50 015

-----  
GERIOU ALL/ RI/souverain. RIEK/souverain ag.  
RIEGEZH/souveraineté. REIZHWIRIEKAAT/légitimer